

I gruol

BRUD
ar Yez hag ar Vro

(4 niverenn ar bloaz)

3-9-66
30F

Komanant-bloaz	15 l.
Komanant-skoazell	20 l.
Studierien, Soudarded	10 l.
An niverenn	4 l.

Rener-Tenzorier : P.-M. MEVEL 14, Breiz-Izel, 29 N Brest
K.R.P. 1499-55 Roazon.

Sekretour : A. MERSER, 6, strêd Beaumarchais, 29 N Brest
(Kas an dornskridou d'ar Sekretour)

Komananterien

*Dibosubl a-grenn eo bevan heb arhant !
Kasit dioustu ho adkomanant, gand eur prof
ouspenn, ma hellit.
Trugarez en a-raog.*

Brud

ar Yez
hag
ar Vro

Niv. 21

HANV-GOANV 1965

TAOLENN :

LUSKELL VA BAG	3
AL LUCHEZ	14
NEIG	21
UR GOMZ ARAOG KROG	29
TETAH	31
YANNIG SKOLAN	36

EN NIVERENNOU DA ZOND, E VO MOULLET :

AR GOULENN DIMEZI, gand Tchehov.
KER AR ROH, gand A. an Diuzet.
LUSKAOU, gand Iwann an Diberder.
MA ZINTIN MILIONEREZ, gand Maria Prat.
AR C'HOARIVA E BREIZ, gand Fanch Peru.
ROLAND TROAD HOUARN, gand Paol Feval, lakaet e brezoneg gand
A. an Diuzet.
PENNEREZ AR GENKIZ, gand Fanch Peru.
EUR BREIZAD BIAN HAG EN-OA KOLLET E VRO, gand A. Morvan.
GWRIZIOU AN DOUAR, gand S.B.
ALANIG HAG E DROIOU KAMM, lakaet e gwenedeg gand A. Boche.
PENNADOU gand F. Danno, Per Helias, P.M. Mevel hag all...

Campagne Populaire
pour la Langue Bretonne

VOUS AUSSI...

afin d'aider **EMGLEO BREIZ**

(Commission Culturelle du C. E. L. I. B.)

à obtenir enfin **JUSTICE**
pour la langue et la culture bretonnes

vous signerez la Pétition demandant :

- La reconnaissance des droits de la langue bretonne et l'organisation de son enseignement,
- La création d'émissions en langue bretonne à la Télévision régionale et l'élargissement des programmes bretons à la radio.

En quelques semaines, « Emgleo Breiz » a recueilli plus de **15.000 signatures** à la présente pétition : ce nombre doit être rapidement doublé.

Soyez parmi les 30.000 premiers signataires !

« Il n'est plus possible d'admettre que le breton soit, en Europe et en plein XX^e siècle, l'une des quatre dernières langues, avec la langue d'oc, le basque et le catalan, contre lesquelles on pratique systématiquement une politique d'étouffement qui n'a d'autres fondements que des préjugés désuets.

(Plan culturel breton du C. E. L. I. B., 1962).

« C'est par souci de l'avenir et guidés par un idéal de progrès et de véritable démocratie que nous demandons l'enseignement des langues régionales ». — (Propositions Bayou, 1959 et 1963 ; 8 Propositions de loi déposées depuis 9 ans par des parlementaires de toutes tendances).

Qui peut signer la pétition d'« Emgleo Breiz » ? Non seulement tout Breton, même s'il est fixé loin du pays, mais tout citoyen Français, tout visiteur étranger tenant à témoigner sa sympathie à la Bretagne et à la culture celtique.

T. S. V. P.

LUSKELL VA BAG

Evel stêriou dihlannet ha bleniet mad, koulskoude, eh aloubas an enebourien Bro-Frañs. Nebeud a zeveziou war-lerh freuzadur an talbenn, e kostez Sedan, e oe ar zoudarded alaman e Pariz.

Buan, hep kavoud war o hent nemeur a skoill hag a stourm, e tegouezjont e Roazon, en Naoned, e Brest.

E Breiz a-bez ne oe mui gwelet nemed dillad glaz.

Pennfollet e oa an dud er hêriou koulz ha war ar mêziou, en gortoz m'edont oll euz eun darvoud na gomprenent ket hoaz.

On zoudarded, dastumet er hazarniou, a hortoze o dieubidigez a zeblante dezo bezañ tostig-tost ha ne reent ket meur a wad-fall ; ar brezel, a zoñjent, a oa echu evite.

Hiniennou hepken o-doa meizet e peseurt islonk e oa kouezet o bro ; hag e oe glaharet o spered hag o halon.

Siwaz ! evite, ne oe ket kinniget dezo ar frankiz ha, tamm-ha-tamm bemdez, e oent kaset d'an Alamagn.

Padal er hêriadennou bihannañ, en oll vourhiou Breiz, e weled o tond hag o vond, evel merien, paotred o zokarnou plad o klask ober o annez en eur vro binvidig-meurbed.

A-benn nebeud amzer, e kavas pep hini e blas. Tud ar vro, evel konikled dispontet, a gredas, erfin, dond er-mêz euz o ziez. Darempredou en em skoulmas a-nebeudou etre an drehourien hag an henvroidi. Ar vuhez, kreñvoh eged oll venoziou mab-den, a adkrogas adarre tra m'edo ar brizonidi oh uzañ o zoliou war hentou garo an harlu...

En eur porz-mor bihan a vro-Leon, gwarezet mad diouz avel rust ar hornog koulz ha diouz hini yen ar biz, e oa eur hant bennag a zoudarded estren.

Bevañ a reent e ti ar vourhizien.

An ofiser a oa ouz o ren e-noa dibabet, evid ober e annez, eun ti koant nepell diouz ar haer, dres a-dal d'ar mor.

Prenestr e gambr a zigore dirag eur gweledva plijuz-meurbed. Ahane, e wele ar bigi o tond hag o vond war

an dour glaz, luskellet goustadig evel evned mor o tiskuizañ, pe hejet rust a-walh pa zave ar gorventenn, daoust d'ar porz bezañ er gwasked. E lojeiz an adrañ, e veve perhennez an ti, eur wreg yaouank-flamm, gand he bugel nevez-ganet. He fried a oa prizoniad, duhont, moarvad, en Alamagn; ne ouie netra hoaz.

A-benn eun toullad sizunvezioù e resevas eur gartenn; edo he gwaz en harlu.

Da gentañ, êz da gompren, e sellas a-dreuz ouz an ofiser, ouz an den-ze e-noa kemeret leh en he zi hep henn goulenn, zoken. Hag e vevas gand he bugel hep teurel pled ouz monedonea an Alaman.

N'ez ee er-mêz nemed evid he fourvezioù hag ivez, gwech-an-amzer, evid gweladenni he mamm-gaer a veve er penn all d'ar bourk.

An ofiser, eñ, e-noa êset toullañ kaoz ganti; meur a wech; hogen, ar vaouez, seven ha rok war eun dro, he-doa nahet henn ober.

An den-ze, koulskoude, a zeblante bezañ hegarad-kenañ; ober a ree euz e wellañ evid lakaad ar plah en he êz.

Red e oe dezañ dilezel e venoz, ha tremen hep kaozeal...

Eur bloavez a yeas e-biou evel-se. Edod e miz east. An heol a domme muioh-mui. Beb endervez e oa kustum ar vamm da vond gand he bugel war eun draezenn, ouz traoñ an tornaot. Eno, e-pad me veze oh ober stamm, evid he gwaz dreist-oll, e leze ar bugelig, amparfal hoaz, da c'hoari gand an trêz ha da batouillañ er poullou dour.

Eun devez m'edont, evel boaz, o tremen o amzer vak war ribl ar mor, e kavas ar vamm eun amezegez hag en em lakajont o-diou da gaozeal diwar-benn an darvoudou.

Ar bugelig, eñ, a gave eur blijadur vraz o ruillal a bep kostez, dreist-oll er poullou dour. Unan anezo, hep bezañ don ha dañjeruz, a skoe rag-eeun war-du ar mor dre eur ganol a netra. En deiz-ze e oa sioul an oabl, sentuz ar gwagennou; trouz ebed war an draezenn nemed galvadennou skiltruz ar gouelini.

Med an dour a greske dizehan hag a ruze evel eun naer. Ken na dizas ar ganol vihan, ha dre ar ganol, ar poullig m'edo ar paotrig o kouronki.

Prederiet ma oa ar vamm, hag, en tu-hont da ze, o soñjal ganti edo hoaz pell ar mor, ne welas tamm ebed edo he bugel en arvar.

A-daol-trumm e klevas eur harmadenn a-dreñv d'he hein hag e welas eun den o redeg a-benn-herr war an traez daved ar mor. Anavezoud a reas an ofiser a oa o lojañ en he zi. Ar wreg yaouank ne gompren ket hoaz

ar pez a oa o c'hoarvezoud. Pa zellas en-dro dezi, ne verzas ket he mab; neuze e laoskas eur griadenn spouronuz. Gweloud a reas an ofiser oh antren en dour hag a sacha er-mêz eur horvig na zeblante ken bevañ. Redeg a reas beteg ar poull, liou ar maro en he herhenn. An ofiser a reas e seiz gwellañ evid savetei ar bugel; e astenn a reas war e borpant ha lakaad ar gwad-da ruillal adarre en e wazied. Digeri a reas ar paotrig e zaoulagad.

Kerkent e oe kaset d'ar gêr hag a-benn eun toullad devezioù e hellas adarre en em lakaad da c'hoari.

Darbet e oa bet d'ar vamm pokad d'an den e-noa saveteet he mab; med harzet e oe hep ma oufe perag, da gentañ. Kompren a reas kerkent ha deut en-dro enni heh-unan.

Adaleg an deiz-ze, eh asantas derhel ar gomz gand an ofiser ha lezel ar bugel da vond gentañ da bourmen. Med daoust ma oa kement-se eun dra êz a-walh da gompren, e oe kavet er bourk lañchennou hir ha flemmuz da ijinañ ha da gas war-raog bep seurt sorhennou, hep ma oufe ar wreg yaouank netra, zoken.

Padal edo Erwan, ar gwaz, Erwan ar prizoniad, o krakvenañ war eun douar estren, pell-pell diouz ar gêr e goueled an Alamagn.

Eur vuhez garo, poaniuz, start-meurbed e-noa gouzañvet beteg leh diwezañ e sklaverez.

Labourer e-noa en eur porz-mor evel simiad. Eno e kouezas klañv. Goude-ze e pleustras war an hentouhouarn, dindan an erh e-pad ar goañv hag en heol poaz en hañv.

N'hellas ket kenderhel gand ar vicher-ze, hag e oe kaset en-dro d'ar hamp.

Pa oe dambareet, e houlennas mond da labourad war ar mêz. « Ne vefe — emezañ — nemed evid ar bevañs ! ».

Hag eh eas evel mevel en eur vereuri binvidig ma kavas enni daou geneil all.

Evel ma oa eur paotr a-zoare ha liou ar skuiz warnañ, e oe miret d'ober war-dro al loened hag ivez da labourad en ti. Aliez e veze lakaet da zigoavenni al lêz, da fichañ an amanenn pe, hoaz, da zikour mestrez an ti en he labouriou diêsañ. Homañ a oa eun intañvez; he fried a oa bet lazet e Bro-Frañs er brezel 14-18.

Chom a ree ganti eur mab desket-kaer a oa o vrezeli er Frañs, hag eur verh a bemp bloaz warn-ugent. Mariana heh ano. Homañ a oa boudig an tiegez.

He breur a zegase dezi traouigou a bep seurt d'en em fardañ, hag ivez lienaj kaer ha danvez euz an dibab. Evel ma oa faro, e plije dezi diskouez da Erwan an oll draou dispar a reseve. Hemañ a ree meuleudioù d'ar

plah yaouank, o lavaroud e oa ken mistr hag eur Bari-
zianez ha koant evel eun êl. Neuze e save ur barrad
fouge enni.

Erwan a oa deut, tamm-ha-tamm d'en em dommañ
ouz an ti hag ouz an dud. Sioul ha poelleg e oa, ken
na kinnigas ar vamm dezañ dond da zebri gand an tiegez,
er gegin, e-leh chom en eur hraou bennag.

Asanti a reas gand eur joa echu e sklaverez. Eun ti
e-noa adkavet ha tud seven ennañ.

Ne gouskas ket ken gand e geneiled a zistroe beb noz
d'eul lochennig koad bet savet war-dro daou gilometr
alese. Eur gengarantez wirion a oe skoulmet e-giz-se
etre an tiegez hag eñ.

Meur a wech, e-kreiz e labour, en em gave Erwan
e-unan gand ar plah yaouank. Homañ a oa plijuz-kenañ
gand he daoulagad glaz-sklaer evel an oabl hag he bleo
melen-melen. Eur moushoarz hoaluz a vleunie beb ar
mare war he muzellou teo. He horv a oa krog da led-
naad eun disterrañ; med kement-se ne oa hoaz nemed
evid he lakaad da vezañ dedennusoh.

Eun devez, el liorz, m'edont o-daou o c'hwennad, e
kemerjont eun diskuiz war ziribin ar hleuz. Tomm e oa
an heol... An tan a vervas e kalon Erwan hag hini ar
plah yaouank a oe stravuillet. O muzellou en em lakaas
an eil re ouz ar re all, dousig da gentañ, neuz startoh-
startañ...

Adaleg an deiz-ze, e teuas Erwan da vezañ evel stro-
binellet-mik. Hag an amzer a dremenas buan-buan.

Aliez, evelato, e soñje ar prizoniad en e wreg hag en
e vugel. Siwaz! lezenn didrehuz ar garantez a zalhe
Erwan war eun hent n'e-noa ket dibabet. Lezenn an
trehour a ree ar peurrest. Red e oa plegañ d'an diou
lezenn.

Med, e gwirionez, ar bleuniou hag ar frouez a gave
hed-ha-hed d'an hent-se ne oant ket dispiljuz.

A-wechou, koulskoude, e kroge er prizoniad eur spont
divent.

Ha ma vefe dizoloet, eun devez bennag, e zarempredou
gand ar plah yaouank. Divennet groñs e oa d'ar brizo-
nidi, dindan boan kastizou garo a-walh, skoulmañ karan-
teziou gand merhed ar vro.

Med, a-benn ar fin, ne reas ken forz euz an urz-se
hag e lakaas e oll nerz da seveni e eürusted nevez. Hag
an amzer a yee bepred war-raog, dousig, sioulig.

Ar prizoniad a oa anezañ diagent, a oa steuziet en
oabl sklaer hag ehon ar gengarantez. Ne gomprens ken
klemmadennou ar brizonidi all; hañvaloud a ree dezañ
e oa bet treuzlehet en eur vuhez disheñvel gand eur horv

all. Ankounahaet e-noa a-grenn an darvoudou hag o
foaniou.

Eun devez, evelato, e oe dizallet e zaoulagad hag e
tihnunas e spered dirag ar wirionez.

War-dro nav eur diouz ar beure edo o tebri e adlein
e-kichenn e vuiañ-karet pa glevjont er porz boteier ponner
o tostaad...

Eur stokadenn ouz an nor ha kerkent eh antreas daou
zoudard alaman, o fuzuill war o skoaz. Unan anezo a
zachas eur baperenn euz e hodell.

Dremm Erwan a zislivas war an taol. Ar plah yaouank
a jomas evel seizet... Soñjal a ree gante o-daou e oa bet
dizoloet o harantez hag edo an daou zoudard o tond da
gerhad ar prizoniad d'e gas d'an toull-bah.

Ar zoudard alaman a voushoarzas en eur astenn ar
baperenn. Marianna a dapas krog enni hag a lennas :
« Krieggfangene Thomas Yves Nenn 8 542 »; neuze e
roas ar golo da Erwan. Hemañ ne grede ket displegañ
an tamm paper; krenañ a ree e zaouarn; neuze en em
lakeas an daou zoudard da sklokal a-greiz-kalon. Muioh
a-ze e oe stravuillet an daou amourouz. Erfin e hellas
Erwan lenn, pe gentoh kompren ar pezh a oa skrivet; hag
e kouezas e zaouarn difiñv war e zaoulin.

Marianna hi a lennas neuze hag a veizas gwelloc'h
hoaz. Red e oa d'ar prizoniad distrei d'ar hamp braz ha,
goude-ze, d'ar gêr. Dibabet e oa bet da gemer perz en
eur strollad prizonidi dieubet hervez an emgleo a oa bet
sinet etre an diou vro. Dioustu e tlee mond kuit diouz
ar vereuri. Eun taol kurun n'e-nefe ket greet muioh a
spont d'ar plah yaouank. Stoui a reas he fenn etre he
divreh ha gouelañ doureg en eun doare fromuz-kenañ
a rannas kalon an daou zoudard. Komprenet o-doa, int
ivez, rag kement-se a oa eun dra paot a-walh war ar
mêziou.

Eun hanter-eur goude, paket gand Erwan e dammig
peadra, e kimiade an daou garedig an eil diouz egile.
Nag a boan evid henn ober! Red e oe dezañ prometi da
Varianna e teufe en-dro pa vefe echu ar brezel...

En treñ a zouge Erwan hag e geneiled etrezeg ar gêr
e tarze dizehan eul levenez diroll. An amourouz ne lavare
netra; goullou e oa e benn, laosk e gorv. Menel a reas
kousket gand trouz eunton rodou an treñ...

Pa zegouezas war harzou ar vro, e kavas koulskoude
eñ ivez, eur blijadur vraz oh adweloud douar e hane-
digez. Klevoud a reas adarre komz galleg gand tud ha ne
oant ket soudarded. Kement-se a hilligas e spered; hag
e seblantas dezañ dond er-mêz euz eun huñvre...

Bep ma tostae an treñ ouz Pariz e sklaere penn Erwan.

Steuziañ a ree tamm-ha-tamm en e eñvor an eürusted e-noa tañvaet war an douar estren. Gweloud a ree frêz skeudennou ha na oant ket dianav d'e galon : e wreg karet, e vabig, brasaet bremañ, e vamm doujet, e geneiled, e amezien. Dond a ree da zoñj dezañ euz e vro henidig, euz ar mor, euz e labour.

Tremen a reas dirazañ prim-ha-prim, e vuhez tremenet ; hag e sederaas e ene. An eürusted ne oa ket êt da get ; adkavoud a rafe adarre sioulded e gorr hag e spered.

Hast e-noa bremañ erruoud er gêr...

Pa ziskennas Erwan euz an treñ, e porz-houarn e gêriadennig, e kavas daou pe dri geneil. Mond a rejont da evañ eur chopinad en ostaleri dostañ. Trinkañ a rejont meur a wech. Ar joa a splanne war dremm ar prizoniad dieubet.

Ar re all, ivez, a oa joaz ; merzoud a reas Erwan, memestra, e sellent outañ en eun doare iskiz ; med ne reas ket kalz a van. « Marteze — a zoñje — e kav gante ez on chañchet eun disterrañ ! »

Pelloh, war an hent, e kejas gand Mari-Job, eur plah eun a spered. « Distro out, paour-kêz den ? — a lavarashi — Ya ! Mari-Job, a-benn ar fin, em-eus gallet tehoud, o ! en eun doare reiz eveljust ! — Gwell a-ze evidout, Erwan ; pe, marteze, gwaz a-ze ! »

Chom a reas ar paotr dilavar eur pennadig ; neuze e houennas : « Petra a fell dit lavaroud, Mari-Job ? — Feiz ! va foatrig, diêz eo diskleriañ dit ar wirionez ! — Peseurt gwirionez eta ? — Deus amañ, a-gostez, ma kontin dit ; koulz eo dit gouzoud kement tra, an abretañ ar gwellañ ! »

Hag ar wrañ inosant da zibunañ da Erwan ar haoziou a bep seurt a rede er vro diwar-benn e wreg hag an ofiser alaman a oa o vevañ en he zi. « Eun ofiser du-mañ ? — emezañ, ar gwad o sevel d'e benn — ya ! paotrig, evel-se emañ kont er vro ; e pep ti ez eus eun enebour bennag ! — Biskoaz n'em-efe kredet e asantfe va gwreg toullañ kaoz, zoken gand eun Alaman ha mond da bourmen gantañ... ha piou a oar ? — Ya ! eme ar vaouez — piou a oar ? Kred ahanon hardiz, mabig ; aliez ez eont da vale a-gevred war ribl ar mor. Kae beteg eno hag e weli te-da-unan ! »

Digalonekaet-mik, ha diskredig war eun dro, ez eas Erwan da di e vamm. Homañ ivez, daoust dezi bezañ eüruz oh adkavoud he mab, a zeblante bezañ en he

diêzant dirazañ ; ma houennas eñ : « Ha gwir eo, eta, ar pez am-eus klevet diwar-benn Mari ? — Feiz ! — a respontas ar vamm — n'on ket barreg da asur dit ez eo gwir an oll draou euzuz a vez kontet din. Med seblantoud a ra kaoud eur blijadur vraz o pourmen gantañ... hervez. « Pemzeg deiz 'zo bennag em-eus paouezet mond d'he gweladenni ! — Ha koulskoude, mamm, na karantezuz eo bet dalhmad he lizerou ! — Ya ! va foatrig ! muioh marteze eged da re-te ! » Plegañ a reas Erwan e benn.

Med al lorr hag ar boan-spered a oe treh adarre hag e lavaras : « Red eo din talvezoud an dra euzuz-se deze o-daou ! — Arabad dit va bugel, ober re a drouz en deiz a hizio ; toullbahet e vi en-dro ! — N'eus forz, mamm, n'hellan ket herzel ! » Kemer a reas-hi krog e breh he faotr ha, dousig, e kendalhas : « Trehet om bet, Erwan, war bep tachenn ; n'om ken netra er vro-mañ ; chom amañ ganin eur reuziad ha goude e welim ! » Tevel a reas-eñ, ha sioulaad eur pennadig. Neuze e saillas d'an neh er gambr ha war-lerh eur hardeur bennag, e tiskennas. Gwisket e oa bremañ gand dillad deread a-walh kavet er prez. Ne oa ken an hevelep hini. Moushoarzin a ree, zoken. Ar vamm a jomas sabatuet dirag eur hemm ken prim. « Ro eun toullad gwenneien din mamm, gwelloc'h eo mond kuit... e-pad ma talho ar brezel milliget-mañ ! — Ya, Erwan, marteze, med taol pled ; bez war evez ha na rez ket diotachou ! — Bez dijen, mamm, ne c'hoarvezo tamm droug ebed gand den ! »

Didrubillet e oe ar vamm hag e kimiadjont an eil diouz egile. Eun nerz distourmuz a oa savet e kalon Erwan. Nijal a ree e spered etrezeg ar vro a oa o paouez kuitaad. Gweloud a ree en eur vrumenn wenn, tano, dremm ankeniet ar plah yaouank e-noa dilezet du-hont.

Neuze e lugernas adarre e zaoulagad hag e splanaas e vuzellou en eur moushoarz a laouenidigez...

Hep gouzoud dezañ e oa degouezet er porz-houarn.

D'an abardez edo Erwan e Montroulez. Eno eh antreas en eur bureo a-ratoz evid ar re a felle dezo labourad en Alamagn.

Nebeud a dud er bureo-ze. Ne oe ket komprenet ervad ar pez a felle dezañ hag e oe kaset da Vrest.

E Brest e tremenas eun toullad deveziou hep galloud seveni e venoz. Erfin e hellas kaoud eur baperenn gand an aotre da zistrei evel labourer douar en hevelep mereuri.

Kemer a reas an treñ ha, war-lerh eur veaj start a-walh, e tegouezas adarre er vro ma oa ganet enni eur garantez nevez. Adweloud a reas hiniennou euz e gamaraded koz ; med den ne asantas stardañ e zorn. Souezet

e oe da gentañ ha flemmet ; goude, avad, ne reas ken foultre kaer ; da vihannañ e-pad eun nebeud deveziou.

Pa antreas e gegin ar vereuri, e welas eno muih a dud eged boaz. E zellou a baras dioustu war Varianna ; azezet e oa ouz taol, eun tamm bara en he dorn. A-dal dezi edo ar vamm : e-kichenn homañ, eur paotr dianav da Erwan, gwisket kran gand dillad sivil ; hag en tu all d'an daol, stok ouz Marianna, eur zoudard, eur prizoniad.

Trei a rejont oll o daoulagad war-du an estrañjour. Hemañ a jomas a-zav, e valizenn en e zorn dehou, dilavar, abaf, seizet. Ar vamm an hini e anavezaz da gentañ. Dond a reas beteg ennañ o stardañ dezañ e vreh gand eur joa wirion. « Deuit ! — emezi —. Setu amañ va mab ; e permission emañ evid eun toullad deveziou. Ma chomit amañ eur pennadig ho-po amzer d'ober, ho-taou, eun anaoudegez startoh ! » En em zaludi a rejont an eil egile, hep mui.

Marianna a zavas neuze ha, gorreg a-walh, e teuas daved Erwan ha stardañ e zorn. Moushoarzin a ree eun nebeudig. Chom a reas Erwan dirazi, hep fiñval ; ne ouie ket ar pez a oa dleet dezañ ober. Moushoarzin a reas eñ ivez hag e seblantas gantañ e oa eun tamm fentuz e zalh.

Neuze e lavaraz demad d'ar zoudard all. Hemañ ne gomprens netra hag a zelle ouz an arvest hep lonkañ eur begad. Da gentañ, ne respontas het. Erwan a zisklerias dezañ ar pep brasañ euz e vuhez, buan-ha-buan hag e brezoneg, rag divinet e-noa e oa egile eur henvroad.

Hemañ ne gomzas ket kalz ; erfin e lavaraz : « Gwelloh e vefe bet dit chom er gêr ! » Adaleg ar poent-se, ne rannas ken eur grik.

Diêz eta, en em gavas Erwan, pa oe red dezañ lavared e oa deut en-dro evid labourad er vereuri. « Du-mañ — emezañ — ne gavan tamm labour ebed ! — Ahanta ! — a c'hoarzas ar paotr yaouank e sivil — ganin ne chomi ket pell da dermal ; kavet em-eus amañ meur a dra da gas da benn. A-raog ma vo echu ma fermision e vo red dim on zri bezañ sevenet ar pep diêsañ ! »

Antronoz e oa dihun Erwan abred-abred. N'e-noa ket kousket, koulz lavared. Goullo e oa e benn. Klevoud a reas, en traoñ, eun trouz hag a anaveze mad. Marianna a oa war-zav o prienti pep tra evid ma vefe prest lein d'an eur.

Sevel a reas Erwan kerkent. Degouezet er gegin, e kavaz Marianna e-kichenn an oaled. Mond a reas daveti ha pokad dezi doujuz-kenañ. Hi ne lavaraz ger ; selloud a reas outañ ha, trumm, en em lakaas da ouelañ. « Petra a c'hoarvez ganit ? — emezañ — n'out ket laouen, eta,

ouz ma gweloud adarre ? Deut on koulskoude abretoh eged ma oa bet divizet etrezom !... »

Neuze e lavaraz-hi : « Dres ! eno emañ an dalh. Soñjal a reen na zeufes ken en-dro hag e chomfe da skeudenn dalhmad em eñvor. Bremañ ez eus evel eur skoulm bennag torret etrezom ; kollet az-peus da zillad soudard !... Hag en tu-hont, emañ ma breur er gêr ; ouspenn-ze, eun den all a zo hoaz en ti ; kemmet eo an traou penn-ouz-penn ! »

Fraillañ a reas kalon Erwan ; hag e savas ennañ eur barrad gwarizi. « Marteze — emezañ — e plij dit ar zoudard nevez ? — Nann ! n'eo ket gwir, Erwan, n'emañ en ti nemed abaoe nebud amzer... » Tevel a reas o klevoud unan bennag o tiskenn gand an diri.

He breur an hini e oa. « Prest eo ar hafe ? — emezañ — Prest eo ! a respontas-hi — Euz ho pro — a lavaraz-eñ da Erwan — em-eus degaset eun toullad pakadou. Kafe euz an dibab. Tañvaom ! »

Hag int ouz taol. Kerkent e tegouezas ar prizoniad. Azezañ a reas ivez, hep lavaroud ger ha, lonket gantañ e zijuni, eh eas d'e labour. Echu ar pred, e kinnigas mab an ti : « Deuit ganin, ma tiskouezin deoh an oll draou a zo da zeveni er vereuri-mañ ! »

War-lerh ar hrevier, e oe gweladennet ar parkeier. O tistrei d'ar gêr e rejont eun diskuizadenn en eun ostaleri. Evañ a rejont diou pe deir gwerennad bier en eur gaozeal. Kontañ a reas neuze mab ar vereuri e vuhez soudard.

« Ofiser on ! — emezañ — Beteg henn edon e Bro-Frañs, eur vro dispar ma'z eus. Bremañ, siwaz ! ez eo red din mond war-du ar reter, e Bro-Rusia. Startoh e vo va buhez ha, marteze, e vo diêz din dond en-dro ; santoud a ran emañ an traou o vreinañ evidom ! » Neuze e krogas a vouez izel. Seblantoud a ree anavezoud an darvoudou kalz gwelloh eged Erwan.

Hemañ a houlenas : « Penaoz ho-peus greet evid deski ken mad-se ar galleg ? — Feiz ! er skol da gentañ, ha, goude-ze, a-drugarez d'am darempredou gand tud uhel er hêriou ma tremenen enne ! — Ha peleh edoh d'ar poent diwezañ ? »

Evañ a reas an ofiser eur banne bier ha respont : « Edon en eur gêrig war ribl ar mor, e Bro-Vreiz. Du-hont e oa brao dim ; nebeud a labour ; pesked ha kranked da zebri pa garem. Na saouruz eo al ligistri « A l'américaine » evel ma vez lavaret pe « à l'Armoricaïne » hervez tud ar vro ! »

C'hoarzin a ree Erwan ouz e glevoud. Ya ! kement-se a oa gwir. Egile a gendalhas : « Keuz am-eus d'ar porzig-

mor-ze. Dreist-oll abalamour d'eur bugelig am-eus lezet du-hont ! » Erwan a houlennas « Eur bugel bet moarvad diwar an henchou ? »

An ofiser a c'hoarzas a greiz kalon. « Nann — emezañ — eur bugel am-eus saveteet e vuhez dezañ ! » Hag e kontas da Erwan penaoz e oa c'hoarvezet an darvoud.

Ober a reas Erwan dezañ e wellañ gourhemennou. « Ma dever am-eus greet, setu oll. Ha goude-ze — a gendalhas an ofiser — ez om chomet, ar vamm ha me, kamaraded, mignoned hepken. Doujañs am-oa eviti rag poelleg e oa ha parfet e pep keñver. Mond a reem da bourmen, ar bugel ha me, war an traez pe war ar mêz. Eur wech en em gavjom on-zri war an draezenn ; med kompren a ris buan ne oa ket-hi en heh êz, hag e kuitais dioustu, ar paotrig o vlejall war va leh ! »

« Kompren a ran ervad — eme Erwan — ez eo start en em gavoud e degoueziou a zeurt-se ! » Hag e huanadas goustadig. « Eun abardaevez bennag, goude koan, e teot em hambr — a echuas an ofiser — hag e tiskouezin deoh poltredou euz ar paotr bihan ; eur bern am-eus aneze. N'em-eus gellet, siwaz ! kemer nemed eur poltred euz ar vamm, ha hoaz dre laer ! »

Dond a rejont d'ar vereuri.

Daou pe dri devez goude ar gaozeadenn-ze, e pedas an ofiser Erwan da zond en e gambr. Digeri a reas eur voest koad, enni poltredou e-leiz bet tennet amañ-duhont e Frañs. Kemer a reas eur golo ha tennañ dioutañ luhskeudennou a bep ment.

« Sellit ! — emezañ — setu amañ meur a skeudenn euz ar bugel. Na koant ha seder eo, ne gav ket deoh ? — A-du ganeoh emañ — a lavaras Erwan en eur vouchoarzin — ha farsuz war a zeblant ! — Ya, fentuz eo, ha ravailon, ma oufeh ! Setu amañ, bremañ, al luhskeudenn nemeti am-eus euz ar vamm ! »

Selloud a reas Erwan, dievez, da gentañ ; neuze pisoh hag e houlennas en eur grena : « Peseurt ano e-neus ar porzig-mor-ze aotrou ? » An ofiser a lavaras ano ar gêriadenn.

Eun taol kurun n'e-nefe ket greet muih a freuz e spered hag e korv Erwan. Sevel a reas kerkent ha lavaroud : « Mond a ran da gousked bremañ, skuiz on ; kenavo warhoaz ! »

Egile a jomas souezet ha feuket da vad rag kavoud a ree eur blijadur divent oh eñvori e amzer dremenet e-kichenn ar bugelig hag ar vamm.

Anavezet e-noa Erwan e wreg, daoust d'ar poltred bezañ diresiz a-walh. Eveljust e tremenas eun nozvez

digousk kag e prederias muih eged biskoaz war blandedenn mab-den.

Antronoz, e fellas dezañ en em zigarezi. Med an ofiser ne deurvezas ket e zelaou, zoken. Hag e tremenas eun toullad deveziou, hir, start, enoeüz. Den en ti, bremañ, ne zeblante ober van ouz ar paour-kêz Erwan. Marianna, hi heh-unan, a gaoze muih-mui gand ar zoudard all. N'hellas ket Erwan mond pelloh. Eun abardaevez, a-raog mond da gousked, e pedas mab an ti da zond d'e gambr. Asanti a reas hemañ. Neuze e kontas Erwan dezañ penaoz ha perag e oa distroet d'an Alamagn. An ofiser a oe teneraet e galon hag a lavaras : « Bremañ, ez eo red deoh mond d'ar gêr. N'en em chalit ket, ho kwreg a zo anezi eur plah a-zoare, hag ho pugel a zo eun êl gwirion. Pokit dezañ euz ma ferz pa viot distro. Ober a rin va seiz gwellañ evid ho tieubi diouz ho stad dispiluz ! »

Kemend a reas ma oe roet dezañ e frankiz eur wech ouspenn. Kuitaad a reas ar vereuri e gwetur an ofiser, hogoz dre guz ; hag eun toullad deveziou goude e tiskenne adarre e porz-houarn e gêriadenn.

Mond a reas kerkent da di e wreg. Pokad a reas dezi ha d'e vugel en eun doare ken fromuz m'en em lakaas da ouelañ. Hag hi a reas eveltañ. Ne oe kaoz ebed diwarbenn e zistro kentañ. Memestra e oe red dezañ lavaroud : « Fiziañs am-eus ennout Mari. An dud a zo droug, med gwell eo pardoni ; oll on-eus ezomm euz eun tammig gwennañ d'or halon ! » Ne oe ket pell Erwan o kavoud labour war eur vagig pesketaerez. Seder e veze o tishigenni ar pesked : brizili, leoneged, morlouaned hag all.

Eun devez ma oa dous an amzer ha sioul ar gwagen-nou, en em zantas eüruz o vrañskellad a-gevred gand ar mor hag en em lakaas da ganañ : « Luskell va bag, war gribenn ar mor, luskell va bag ha red !... » « Ya ! — a zoñjas — luskell ha red, med hepken en-dro d'am zi ha d'ar garantez wirion ! »

A. AN DIUZET.

AL LUCHEZ

Pa chomas an treñ a-zav er porz-houarn bihan, war linenn vraz Pariz-Brest, e oa krog-kaer da nozi. Ne ziskennas nemed eur beajour, eun den a zaou-ugent vloaz bennag. Dougen a ree, war e gein, eur vantell goareg hag en e zorn dehou, eur valizenn. Rei a reas e villed d'an implijad ha mond er-mêz, mall warnañ. Selloud a reas neuze en-dro dezañ ha goulenn digand eun implijad all : « N'eus gwetur ebed hizio ? — Nann, Aotrou, n'eus nemed unan bemdez ; dond a ra hepken evid an treñ deg eur beure ! »

Grozmolad a reas ar beajour o soñjal, moarvad, en eiz kilometr e-noa da gerzoud a-benn tizoud ar gêriadenn m'edo eur heneil dezañ o chom, eur hamarad euz ar Brezel Braz.

Kemer a reas penn e hent. Padal e oa ét an treñ kuit war-lerh eur c'hwitelladenn skiltruz ; klevet e veze hoaz trouz ar rodou du-hont en tu all d'ar run.

« Du-pod e vo pa zegouezin ! » a zoñjas ar paotr. Evid gwir, kemeret e-noa an oabl liou an hañv. A-uz d'ar baleer e oa stegnet eur vantell deo divoull. Tro-dro dezañ ne wele na riblou an hent, nag al lann alaouret ; gwech an amzer, hepken, e spurmante eun tiig bennag duoh eun tammig eged an deñvalijenn.

Savet gantañ eur hreh. e chomas eur pennadig da arvesti.

A-dreñv dezañ eun toull du ; dre eno e oa tremenet. Dirazañ eun toull all, teñvalloh hoaz ha divent. Diskenn a reas ar beajour eur hrav, sonn da gantañ, ha tamm-ha-tamm êzetoh.

Tremen a reas dre eur gêriadennig ; seblantoud a ree dezañ na oa kristen ebed o chom enni. Merzoud a reas erfin, bannou abaf ar goulou oh en em zilañ etre ar stalafiou ha klevoud moueziou damvouget o kuzulikad e diabarz an tiez. Gweloud a reas ivez eur skeud o vond buannañ ma helle war-du eun ti-soul, o tigeri an nor hag o vond tre.

Eur pennadig goude-ze, en em gavas ar baleer nepell diouz eul lenn. Bep ma tostae, e kreske ar meleour. Eun

êzenn freskoh en em lakaas da c'hwezañ o tegas ganti eur zonerez iskiz, hini ar broenn, tro-dro d'an dour. En tu all d'al lenn, edo ar menez, diflach, spontuz evel eul loen du war hed e foñs an oabl, a-rez d'an douar. Kenderhel a reas ar gwaz gand e hent. A-daol-trumm, e tivinas e oa unan bennag en e raog rag klevoud a ree eun trouzig boud war ribl an hent. Prestig e spurmantas eur skeud o kerzoud pe, kentoh o piltrotad dirazañ. « Petra ar foeltr — eme ar beajour — eo kement-se ? N'eo ket eur hristen, a-dra-zur ! Eul loen, sur-mad. Eur marh marteze?... nann, brasoh e vefe. Eur hi ? nann, kennebeud, bihannoh e vefe neuze ! »

Prederiet e oa ar paotr gand ar gudenn-ze. « Iskisat krouadur ! — a zoñjas — n'eus nemed tri zroad, unan a-raog ha daou a-dreñv ! » Kaer e-nevoa dispourbellañ e zaoulagad, seul vui ma selle, seul nebeutoh e komprene... Ma krogas da eñvori ar mojennou klevet gantañ gwechall e korn an oaled.

« Arsa ! — a lavaras ennañ e-unan — gand ar vez ! Biskoaz n'am-eus bet aon rag netra ! » hag ez eas buannoh war-raog. E berr amzer, en em gavas e-kichenn ar spes kevrinuz. Neuze e tirollas da c'hoarzin. Ma chomas ar skeud a-zav trumm.

« Nozvez vad ! — eme an den — C'hreñ ! — a reas ar skeud — Daoust hag eñ emañ hoaz pell diouz Kêr-wenn ? — C'hreñ ! — a respontas adarre ar vouez — Kae da zutal 'ta, koz gwrah an diaoul ! » eme ar beajour droug ennañ.

E gwirionez, eur plah an hini e oa, eur vaouez war an oad. Harpet e oa gand he daou zorn war eur vaz teo ha berr. Mond a ree war-raog e-giz m'e-nefe greet eun trebez o c'hoantaad dilezel an oaled. Daoublegañ a ree bep kammed hag adsevel eun disterrañ. Med he fri a jome dalhmad troet war-du an douar. Hastañ a ree bre-mañ ar baleer, rag eur hlizenn dano a oa krog da hlebiañ e benn. Tizoud a reas ar gêrig ma felle dezañ tremen an noz, rag chom a ree e geneil war ar mêziou ha n'helle ket adkavoud ar vereuri dre an hentou bihan hag ar gwenodennou.

Antren a reas en eun ostaleri : « Bez' ez eus eur gambr ? — a houennas. — A-dra-zur ! — a respontas an tavarnour, hegarad-meurbed — med n'hellan servijañ deoh nemed eur goan dreut ! — Ha petra 'ta ? — Feiz ! kig sall gand avalou-douar ! »

Lugerni a reas daoulagad an estrañjour ; pell 'oa n'e-noa ket tañvaet eur pred ken saouruz.

Pa oe karget mad e gov, e houennas eun tammig plas e korn an oaled ma teve enni eun eteo a-bouez.

Yen e-noa, bremañ ma oa sioulaet ar gwad en e wazied.

En e gichenn, war an tu dehou, edo an ostiz ha, war an tu kleiz, an ostizez oh ober stamm.

Trumm, e teuas da zoñj d'ar beajour euz ar vaouez e-noa kejet ganti p'edo o tond etrezeg ar bourk. « Ha gouest oh — emezañ — da ziskleriañ din piou eo ar plah kromm am-eus kavet war va hent bremaig? Iskisat gwrah! kerzoud a ree evel eul loen kamm! »

Kerkent e paouezas an ostizez gand an nadoziou ha, neuz ar spont en he daoulagad, e lavaras : « Mond a ran da gousked, skuiz on! ».

Hag hi d'an neh heb eur ger ouspenn.

Mousc'hoarzin a reas ar pried ha hejañ e ziouskoaz. Neuze e komzas evel-henn : « Evid ober plijadur deoh, e kontin buan-ha-buan istor ar vaouez-se! » Pasaad a reas evid sklaeraad e vouez ha tufañ, goude, e ludu an oaled. Neuze e krogas gand e gaoz.

Red din, da gentañ, komz deoh diwar-benn al Luchez ! « Al Luchez? — eme ar beajour — Ya! bez' ez eus er barrez-mañ eur plah, koz a-walh, o chom stok ouz ar bourk en eun ti bihan dereat ha koantig. Luchañ a ra da vad. Evel ma lavar Loeiz, ar hereer, unan euz he daoulagad a zell war-du Gwengamp e-keit m'emañ egile o parañ war Vrest...

« Chomet eo sonn he horv, daoust d'ar bloaveziou. Dougen a ra, d'ar zul, eur hoof mistr, ampezet mad hag eun davanjer brodet-kaer. War horre, he-deus eur chal gand karreziou a liou ha pimpillou hir. Eun dieurenn e tlee bezañ en he youankiz...

« Med, en overenn, ne chom ket e-touez ar gristenien all. Kavet he-deus eur plas sioul, stok ouz eur piler; hag eno e lavar he faterou hep soursial ouz den, nag ouz ar person zoken... Ne gomz nemed gand eur goueriadez a zegas dezi laez, amanenn hag all eur wech ar zizun. Ne vez ket gwelet nemeur en tiez-kenwerz, nemed dre red e vefe. Tremen a ra dirag an oll evel eur briñsez...

« Eun tamm gwarizi a zo en he heñver; med kement-se n'eo netra e-skoaz ar rebechou all... — Ha petra 'ta? — a houlennas ar beajour, plijet gantañ ar gôz — Setu! — eme egile — » Gwelet ho-peus, bremaig, va gwreg o spouronañ hag o vond kuit. Ahanta! ne fell ket dezi klevoud komz euz ar plahed-se. Tamall a reer ouz al Luchez bezañ eun doare sorserez. Ya! gouestlañ a ra heb enebourien, pe o loened. Penaoz? ne ouzon ket!...

Amañ en em lakaas an estrañjour da vousc'hoarzin, hep re. Neuze e houlennas : « Med piou eo ar vaouez kromm am-eus kejet ganti war va hent? »

Pasaad a reas an ostiz, skrabañ e benn, goude-ze e

elgez, ha tufañ en oaled. Bolzenni a reas e vruched evel pa vefe bet o vond da zistagañ eur brezegenn helavar e kambr ar gannaded.

« Setu — emezañ — istor ar plah kromm... Kenoad eo gand al Luchez. Anna eo heh ano. Pa oant bihan o diou, e oant mignonezed braz. Med sevel a reas kementre eur warizi start, didrehuz, en askont d'eur paotr yaouank a garent koulz an eil hag eben...

« Eur gaer a blah e oa al Luchez d'ar mare-ze — hervez — ha ne luche hoaz nemed eun nebeudig. Kementse ne vire ket ouz an dud yaouank d'ober serr-lagad dezi, d'ar zul, e-pad an overenn ha, goude kreisteiz, er pardoniou tro-war-dro...

« Eun dister-dra! — a lavarent — Ya! med hi a oa lorhuz da vad ha dismegañsuz e-keñver heh amourouzien...

« Tamm-ha-tamm e teujont da dremen heb ober lez dezi ha ne gavas ket, zoken, eur gamaladez da vond da vale ganti. Neuze e kustumas mond e-mêz ar barrez. Kavet e veze o pourmen en-dro d'al lenn, war ribl an hent braz pe, hoaz, e kêr Montroulez...

« Eur zulvez e teuas eur paotr yaouank d'he herhad beteg ar bourk. Eur haer a baotr, kreñv ha tan en e zaoulagad. Mond a rejont o-daou kazel-ha-kazel hep selloud ouz den. Ma savas gwarizi e kalon ar yaouankizou...

« Hag an teodou da vinimañ hag ar speredou d'en em drebasad...

« Eul lun beure e tegouezas-hi e ti ar gemenerez, Mari Jaouen, gand bravigou euz ar gaerrañ : eun dro-houzoug aour hag eur bizaoued lugernuz. Ma chomas bamet Mari. C'hoant he-doa al Luchez ma vefe greet dezi eur zae nevez...

« Eur zizunvez e tremenas heb dond d'ar barrez. Goude-ze, ne oe gwelet nemed a vare da vare. Bep gwech, e veze kaerroh-kaerrañ. Mantret e oa he herent daoust deze reseo diganti eun toullad gwenneien. Med a beleh e teue an arhant-se? A-dra-zur e oa mestrez d'ar yaouank duard. Ha petra a ree hemañ? Ne gave den eun diskoulm d'ar gudenn, kaer e-noa pep hini klask, furchal, gedal ha spiañ...! »

« Sehed am-eus! — a lavaras an estrañjour — n'ho-peus ket eur banne « flip »? — Eo, avad, Aotrou; ar boeson yen, ne ra ket a vad e-kichenn an tan! » Hag eh evjont eur volennad sistr tomm gand eur veradenn gwin-ardant. « Al lambig-mañ — eme an ostiz — a zo en ti abaoe pemp bloaz. Ne vez servijet nemed dibaot

a wech ! — Trugarez deoh ! — a respontas egile hegarad-kenañ. »

« Dalhom gand ar gaoz... Eur beurevez, e tegouezas er bourk eun den pennfollet-mik. N'helle ket distagañ eur ger, zoken. Diskouez a ree gand e viz eun dra bennag, diwel du-hont, war-du al lenn... A-benn ar fin e hellas kaozeal : « Edon — emezañ — deh da noz, em harr, o vond etrezeq Montroulez, pa zaillas daou zen diwar ar hleuz. E berr amzer, e oe difrapet diganin va oll arhant hag evel ma oan bet skoet e-mêz va gwetur, e tiskampas va marh. Redet am-eus e-pad an noz. Siwaz ! n'am-eus ket gallet e adkavoud. Gwasat tra ! »

Evel ma heller kredi, ez eas an teodou en-dro er barrez hag en trowardroiu.

« Karedig al Luchez an hini eo, moarvad, eñ hag eur heneil dezañ ! — Pe, marteze, eñ hag al Luchez, hi-heh-unan, gwisket e-giz eur paotr ! » A-walh e oa bet lavaret. Adaleg an deiz-se e redas ar vrud-mañ dre ar vro a-bez : bez' e oa daou laer o hedal ar veajourien war an hent braz, nepell diouz al lenn ; hag an daou forban-ze ne oant a-dra-zur, nemed al Luchez hag heh amourouz.

Eveljust e oe kemennet ar helou d'an archerien ha, bemdez, e weled hini pe hini anezo o tond d'ar bourk da houlenn diskleriadurioù. Eun devez e lavaras ar brigadier d'am mamm, amañ, en ti — bihan e oan d'ar houlz-se : « Kaer am-eus ober enklaskou piz, n'hellan ket dond a-benn da zirouestlañ ar gudenn. Adkavet eo bet an den yaouank e vleu du-pod. Emañ o labourad en eur bureo e porz-houarn Montroulez, eur plas paeet mad. Anavezoud a reer ivez e garantez evid al Luchez ; med n'eus netra da rebech, nag outañ, nag outi ! »

Tremen a reas an amzer, med ne oe ket ankounahaet an darvoud braouahuz.

Koulskoude e oa deut al Luchez da jom er bourk. Prenet he-doa eur stal dillad ha lienaj. Aliez e teue he haredig d'he gweladenni. Mond a reent da zañsal hep mez rag ne ouient ket ar pez a veze lavaret diwar o fennou.

Berz a ree ar stal evelato. Kement-se, moarvad, a oa kirieg da ranellder an dud, prest dalhmad da houzoud ar penaoz hag ar perag euz buhez o henseurted.

Unan euz ar gwellañ ostizien e oa Anna. Dond a ree beb an amzer eno, dreist-oll pa ouie edo ar gwaz er gêr.

Er baliou, e veze bepred stok ouz ar houblad hag e teue a-benn a-wechou, da zañsal gand ar paotr kaer ha mistr.

Eur zulvez, e soñjas ganti e oa deut ar houlz da

ginnig dezañ he harantez. Siwaz eviti ! dispeget e oe dioustu ha kaset d'he hlud.

Adaleg an deiz-se, e kreskas ar warizi he doa maget a-vihannig e-keñver he mignonez. Hi an hini he-doa ijinet istor ar plah treuzwisket e paotr ; hi an hini a gase war-raog an oll sotonioù hag ar hoz kaoziou diwar-benn an daou amourouz.

Bremañ, avad, en em lakaas he zeod da drotellad ha da vinimañ muioh hoaz. Kemend a lavaras, ma paouezas an dud da vond d'ar stal ha ma oe red d'al Luchez gwerzañ de feadra ha mond da Vontroulez evid galloud bevañ.

Med gouzoud a reas piou he-doa c'hoariet dezi eun dro ken divalo, ken euzuz. Eun devez, a-raog kuitaad ar barrez, e kavas heh enebourez war he hent. Kerkent e oe tabut kenetrezo.

Al Luchez n'he-doe ket amzer da zigeri he genou ma krogas eben dioustu ganti : « Ma n'eo ket eur vez evid eur strakell bale, e-giz-se, e-touez ar gristenien. Kae da adkavoud da estrañjour, eun den a netra, eul laer m'emañ e blas er galeou. Ha da hini-te war eun dro ! »

O klevoud an trouz, e oa en em vodet eun toullad parrezianiz en-dro dezo. Chom a rejont oll bamet o selaou ar gunujadenn daer-ze ha dreist-oll, dirag al liou a oa e kerhenn al Luchez. Gwenn e oa he dremm evel eul liñsel ; stlakañ a ree he dent evel eur hi prest da gregi ; en he daoulagad, deut da vezañ spouronuz, e lugerne flamm an ivern ; luchañ a ree muioh eged biskoaz ; ne oa ket kaer da arvesti.

A-greiz-oll e vlajas, ken na grenas ar bourk a-bez :

« A-raog ma vi kaset d'ar vered, loen binimuz, a-raog ma vreino da eskern ha ma vo gwalhet da ene, merh an diaoul, e stoko da fri ouz bizied da dreid ! »

Hag hi kuit heb eur ger ouspenn. Eur gridienn a dremenas a-hed livenn-gein an arvesterien !... »

Chom a reas an ostiz mud e-pad eur pennadig amzer. Ar zelaouer a zeblante prederiet da vad. Heb ober van e fellas dezo evañ eur banne. Goullo e oa ar gwerennou. Neuze, o tiskenn eun dakenn hini-kreñv, e farsas an ostiz : « Ahanta ! va mignon, krog oh da gompren bremañ ! — Feiz ! nann, ne welan ket ervad ! — a respontas egile — Arsa ! memestra ! ar vaouez koz m'ho-peus kejet ganti war an hent braz, n'eo nemed Anna, enebourez al Luchez ! — Ya ! ya ! deut on e-barz, a-benn ar fin ! »

Hag e tirollas da c'hoarzin. « Neuze 'ta ! — emezañ — e kredit-c'hwil e kontadennou a-zeurt-se ? — Selaout ! — a respontas an ostiz — Da gentañ, ne reas den ebed fed ; med anad e oa e teue kein Anna da volzenni a-nebeudou...

« Red e oe dezi en em harpañ war eur vaz hag e chomas erfin hep galloud labourad. Selloud a ree an oll outi gand truez ha spont, eun disterrañ. Bremañ ez eo nammet da vad. N'eo ket gouest da zelloud ouz eun den. Emañ dalhmad he daoulagad paret war boutrenn an hent ha, prestig, moarvad, n'hellow ken bale, eun druez ! »

Evañ a reas an daou geneil nevez eur werennad gwin tomm, en dro-mañ, ha, goude-ze, ez ejont da gousked.

Tremen a reas ar beajour daou pe dri devez er vro. Bemdez e teue gand e gamarad euz ar vereuri d'ar bourk da lipad eur banne bennag. Eet e oa dija e-biou sorhennou an ostiz.

Daou vloaz bennag war-lerh ar veaj-ze, e teuas adarre ar beajour d'ar vro. E geneil e oa kouezet klañv-fall ; eur hleñved dibare... Goude an interamant, ha greet gan-tañ e hourhemennou a gengañv d'ar familh, e teuas da lojañ en hevelep ostaleri. Chom a rejont, an ostiz hag eñ, da gaozeal pell a-walh diwar-benn ar hamarad et da anaon.

A-greiz-oll e teuas da zoñj d'an estrañjour euz an istor a oa bet kontet dezañ diwar-benn Anna hag al Luhez.

« Ha penaoz emañ ar bed gante o-diou en devez a hizio ? — a houlennas — Feiz ! — eme an ostiz — interet eo bet Anna bremañ ez eus eur zizunvez bennag. Eun darvoud braouahuz ! Deut e oa he horv da vezañ ront evel eur helh. Ne gerze ken eveljust ; kentoh he-defe ruillet. Red eo bet d'ar munuzer prienti eviti eun arched ledan ha berr, eun doare penton. Mantrusat tra !... »

« Bez' e oa kalz a dud en interamant ; ne gomze den ; ober a reas ar person evel boaz ; med en iliz e oa evel eun doare êzenn diaouleg mesket gand hini an ezañs ; berr e oa war alan peb hini ! » Tevel a reas an ostiz.

« Hag al Luhez ? — a houlennas an estrañjour — Ahanta ! kavet eo bet krouget en he zi, gand eul las he-doa staget ouz eun treust. Kredi a ra darn he-deus bet aon rag na vefe tamallet outi maro he mignonez wechall. Hervez darn all n'he-doa netra ken d'ober war an douar-mañ peogwir e oa et da anaon heh enebourez, an hini a zegase soñj dezi dalhmad euz he harantez evid an duard kaer a lakaas he halon da entani ! »

Trinkañ a reas an daou baotr... An deiz war-lerh, o tond en-dro d'ar porz-houarn, e tremenas ar beajour a-hed al lenn, e-rez d'ar menez. Mouzet e oa an amzer. Nebeud a diez a zehou hag a gleiz. Beuzet e oa ene an den en eur mor a zoñjennou kemmesket.

« Emaon e Breiz ! — emezañ, ennañ e-unan — eur vro iskiz ! »

NEIG

Anvet e oa bet ar plahig vihan Renea, en askont d'eur voereb d'he mamm a zouge an ano-ze. Nea Vihan a ree an oll anezi, pe hoaz Neneig. Tamm-ha-tamm, koulskoude e verreas he lesano beteg dond da vezañ Neig hebken. Hag evel-se e kendalhas an dud d'heh envel.

Ganet e oe en eur vourhig a Vreiz-Izel, a-haoliad war Vro-Leon ha Bro-Dreger, eur vourhig savet a-hed eun hent braz.

Edo lojeiz al Lantoned, kerent Neig, e-kreiz ar bourk, drez stok ouz an ti-kêr, e korn eur hroazhent. Eno e oe dizammet ar vamm ha dinehet war eun dra, rag soñjal a ree ganti na zeufe ket da vad ar hanedigez, kemend a drubuill he-doa gouzañvet e-pad ar vrazested.

Laouenaet e oe he halon pa glevas garm kentañ ar bugelig ha pa welas e oa ar horvig lard-awalh. A-wechou e oa bet deut d'he spered e varfe ar hrouadur en he hreiz. Tremén a reas eurveziou kriz adaleg an deiz ma oe interet ha gwaz beteg an hini ma stardas war he bruched ar verhig koant a vefe bremañ eviti eur frealz hag eun adskeud euz he fried.

Kreski a reas ar plahig hep kalz a boan. Bez' he-doa bleo melen sklaer, daoulagad glaz leun a spered, eun teodig fistilluz hag izili mibin. Eüruz, eta, e oa an diou blah.

Siwaz ! war-lerh he femp bloaz e paouezas Neig da greski evel ar vugale reiz ; dond a reas, zoken, da gasti-zañ, da dreutaad da vad ha da glemm gwech an amzer.

Ne ouie ket drez peleh he-doa poan ; santoud a ree, evelato, eun droug tano oh en em zilañ enni hag o kemer muioh-mui a leh.

Tristaad a reas ar vamm. Galvet e oe meur a vedisin. « Kalz a evez ha boued mad ! » a lavarjont oll. Hag e reas ar paour-kêz plah hervez an ali-ze.

Lartaad a reas ar bugel e-pad eur reuziad ; med prestig goude, e kreskas re vuan hag e teuas da vezañ evel eur vaz kloued. Hirraad a ree ivez he dremmig wenn ha bra-saad he daoulagad. Ne oa ket kement-se eur zeblant mad.

Digalonekaet e oe ar vamm. Med ar plahig a labourer start er skol hag a veze dalhmad lirzin. C'hoant he-doa da drehañ war he hamaradezed. Hag e teue a-benn d'henn ober, aliez, en askont d'he spered lemm. Evel-se e frealze eun tammig he mamm garet.

D'an oad a zaouzeg vloaz, gonezet ganti he santifikad, e oe red da Neig mond d'ar sklolaj. Eveljust n'eas ket he yehed war wellaad; med stourm a ree, evelato; kanañ e ree ivez war-lerh he labour ha c'hoarzin ha farsal. Ma oe doujet gand an oll. E-pad an ehan-skol, e chome Neig dalhmad e-kichenn he mamm da lemm, da ganañ, d'ober stamm hag all...

El leoriou e kave istoriou fromuz, danevellou skrijuz, mojennoù plijuz a gase he spered hag heh ene peli diouz ar vro. Seul-vui ma tremene an darvoudou pell-pell diouti, seul-vui e veze eüruz. Ne veve, eta, nemed dre neuz he faltazi ha dre zouster he halon a oa tener ha brokuz.

Ober a ree stamm hebken evid sikour he mamm. « Neig — a lavare homañ — arabad dit en em skuizañ; kae da vale eur pennadig! » Poan gollet. N'ez ae da bourmen nemed gand he mamm.

Kavoud a ree plijadur, en nevez amzer, o kutuill bleu-niou, o trohañ begou tener an drez evid o debri, o selaou al labourer o wihal er girzi pe o filipad war skourrou ar gwez. Selloud a ree ivez ouz an alhweder o richanañ en eur bignad sonn en oabl.

A-drugarez d'ar barrez ha da zikour ar stad, e hellas heuliañ he studioù; hag e tremenas heh arnodennou êz-tre, evel en eur c'hoari...

Triweh vloaz e oa bremañ; felloud a ree dezi bezañ implijadez en eun ti-post. Labourad a reas, eta, tennoh eged biskoaz rag diêz a-walh ez eo ar genstrivadeg.

Gwech an amzer, e chome he mamm da zelloud outi. Ne lavare netra, Med gweloud a ree edo daoulagad he merh o teñvalaad.

Hag e huanade doaniuz. Soñjal a ree n'hellfe ket kenderhel Neig gand eur stourm ken poaniuz. Esêañ a reas he miroud ganti eur bloavez. « Nann, mamm — eme ar verh — a-benn nao miz e vo echu va studioù hag e vin barreg da honid va buhez, dizalh he mad a-walh evid bezañ em êz! »

Mond a reas ar miziou e-biou, gorreg-gorreg, hervez ar vamm ha prim evel eun tenn da zoñj Neig.

Resevet e oe ar plah yaouank er genstrivadeg. Da genver miz here, e oe anvet en eur gêr vraz; deread e oa he flas. Mond a reas he mamm ganti. Bep beure ez ê Neig d'he labour; distrei a ree d'he merenn evid adkregi da ziv eur. Neuze d'an noz, sevenet ganti he dever, e

lenne beteg diwezad en noz. Rouez kaer e oe baleadennou an diou blah. D'ar zul, hepken, ez eent war ar mêz; med ne joment ket pell rag buan e skuize Neig.

Aliez, bremañ, e houzañve gand ar boan-benn beteg semplañ, zoken. Chom a ree treut; moan e oa he diougrozell ha krommañ a ree he hein eun disterrañ. Nehet, glaharet e oa ar vamm.

Petra ober? Dalhmad an hevelep ali euz perz ar vedisined; debri mad ha tremen heb labourad e-pad eur reuziad.

Med Neig ne felle ket dezi bezañ eur garg evid an hini he-doa dija bet kemend a drabaz ganti. Hag e kendalhe, kaloneg. Selloud a ree ouz ar re all o tond hag o vond, o c'hoarzin hag o kanañ, o ouelañ hag o fulori, o tisplegañ o menozioù, o hetañ traou diêz da zeveni, o komz diwar-benn o dimezi, an dud yaouank a garent pe ar re a zisplice dezo.

Fent he-devez Neig ouz o hlevoud. Heh eürusted-hi a oa en diabarz. Ha, koulskoude, evid eun den evezieg, e vefe bet êz merzoud ar sked a strinke euz he daoulagad, daoulagad eur plah klañv, a-dra-zur, med, memestra, sked an esper en eun dra bennag diresez eviti.

Abaoe eur pennadig, e oa deut daou bried da chom er straed ma vevent enni. Hi, eur vaouez a hanter-kant vloaz bennag o vevañ diwar he leve. Eñ, eur paotr kenoad ganti. Rener e oa en eur bureo euz ar Prefeddi. Bez' o-doa eur mab, eun den kreñv ha mistr, eeun ha feulz e zellou evel re e vamm. Ijiner e oa en eul labouradeg.

Dre zegouez, e kejas ar vaouez gand mamm Neig e ti an ispiserez. Latennet mad e oa an Itron ha tamm-ha-tamm, e oe skoulmet darempredou etre an daou diegez.

Da gentañ e kavas Neig eneoùz ar gweladennou-ze en askont d'an diou glakenn. Neuze e tistroe war-du ar gwaz hag e kontent an eil d'egile doareou o micher.

Gwech an amzer e veze pedet ar paotr yaouank d'ar bodadennou-ze. Ne blije ket an ijiner da Neig. Ne oe ket pell o verzoud e oa heñvel-mik ouz e vamm evid pez a zell ouz an temz-spered. A-hend-all e oa turgnet brao e gory evel hini an tad.

N'helle ket Neig plijoud dezañ, kennebeud. Bez' e oa anezañ eur paotr desket, sur-mad, med lorhuz-kenañ; skianteg, med digar; fougeüz med dizesk er pez a zell ouz traou dister ar vuhez ha darempredou etre an dud. Ha neuze, Neig ne oa ket eur gaer a blah. Pa bare homañ he daoulagad lemm warnañ ha pa vouchoarze he muzelou en eun doare goapaüz, en em gave diêz ar paotr yaouank hag e tehe kerkent ha ma kave an tu d'henn ober.

Ne oa ket heñvel ouz e dad war ar poent-se. Hemañ

a oa anezañ eur paotr hegarad — meurbed ha reiz a spered ; re abaf, marteze ha douget da lakaad e fiziañs en oll dud.

Ne gomze ket nemeur, med plijuz e oa pa gonte kaoziou en eur vutuni rag techet e oa d'ar si-ze daoust d'e yehed bezañ gwan a-walh.

Eun devez e oe anvet e vab e kêr Lyon. Adaleg neuze, e chomas aliez e-unan rag felloud a ree d'e wreg mond da vevañ tost d'he bugel nemetañ.

Chom a ree gantañ beteg e-pad c'hweh miz hep dond d'ar gêr.

Padal e veve an tad en ti-debri. Kantren a ree a-hed ar straedou etre e bredou ha goude e labour. Med enoeüz e kavas ar vuhez-ze ; ha kaer en-deveze lenn, ne dremene ket buan an amzer.

En eur stumm a oa eüruz rag ne oa bet biskoaz e wreg gwall evezieg en e geñver. Rebech a ree outañ dispign arhant en eun doare diboell. Ha koulskoude, ne veze lezet gantañ nemed peadra da brenañ e vutun.

Bremañ, avad, e oa eun tamm ponnerroh e yalh. Med, memestra, en em gave, dre re, en digenvez.

Gwech an amzer e pede mamm Neig ar paour-kêz den da verennañ gand an diou blah. Neuze e kustumas dond, bep nozvez, goude koan, da dommañ e-kichenn an oaled ha da gaozeal. Tamm-ha-tamm e sederaas. Plijoud a ree dezañ lenn a vouez uhel evid Neig ; evel-se ne skuize ket ar plah yaouank he daoulagad. Goude-ze e hoariant kartou, pe, hoaz, domino. Aliez, pa veze re hir ar breutadennoù kenetreze, ez ee ar vamm da gousked. Neuze e konte-eñ d'ar plah yaouank ar pezh e oa bet e vuhez beteg ar poent-se, ar boan-spered e-noa gouzañvet o vevañ e-kichenn eur vaouez ken berrboell, ken piz ha ken digar. Chom a ree Neig d'e zelaou, glaharet, doaniet dirag kement-se a anken kuzet e don ene eur gwaz. Hag he-doa truez outañ ; hag e fellas dezi lakaad eun tammig mel e buhez treñk heh amezeg.

« M'am-befe bet eur verh, da vihannañ, e-leh eur mab, e vefe chomet tost din ! — a lavare — Plijadur am-efe bet ouz he gweloud o kreski hag o sevel eur famil ! »

Hag e kredas, eun abardaevez, flourañ bleo Neig gand e zorn. C'hoarzin a rejont o-daou ha, kerkent, chom dilavar. N'he-doa ket ar plah yaouank anavezet he zad ; biskoaz n'he-doa bet santet dorn rust ha nerzuz eur paotr warni. Fromet e oe eun disterrañ ; neuze e ruzias, eur houlaouenn a joa en he daoulagad.

« M'ho-peus c'hoant — a gendalhas-eñ — e viot ma merh hervez ar spered hag an ene ? » Ne respontas ket-hi, da gentañ. Stouet e oa he fenn. Trumm e savas he daou-

lagad heg o sankañ he zellou e daoulagad heh amezeg e lavaras : « Ya, felloud a ra din ! » Bamet e vanas-eñ o klevoud ar homzou taer-ze. Krenañ a reas ; ne ouie ket hag-eñ edo o huñvreal, pe e gwirionez e oa dihun.

Dislivañ a reas e zremm evid ruziañ kerkent goude. Sevel a reas ha klask dornell an nor da vond kuit ; talmi a ree ar gwad en e wazied ha pennfolli ar menozioù en e spered.

Med ne oa ket evid fiñval. Chom a ree sellou Neig paret warnañ ; eur moushoarz tener ha hoaluz a skede war vuzelloù ar plah yaouank.

Hep kompren petra edo oh ober, e tistroas daveti, e tapas krog dousig en he horv mistr ha gwan, hag e pokas dezi war he zal. Stardañ a reas hi ivez ar gwaz muiañ ma hellas ha pokad dezañ.

Ha ne oe ehan ebed ken d'ar pokou. Ma teuas o muzelloù da steki an eil re ouz ar re all. Hag e chomjont, e-giz-se, hir amzer, rag kavet o-doa eur blijadur dianav, dreist, distourmuz, treh da bep tra.

Siellet e oa o hengarantez ; ne oa bet, eñ, tad speredel da Neig nemed amzer eun eilenn, eul luhedenn-domm...

Adaleg an deiz-ze, fromuz-meurbed, e teuas-eñ beb abardaevez d'ober eur weladenn da Neig. Cheñchet e oant a-grenn. Seblantoud a reent bevañ evid gwir. Splannaad a reas o bizaj ha yahaad o ene koulz hag o horv.

Petra a c'hoarvezas kenetreze e-pad eun toullad mi-zioù ? Ne hellfe den hel lavaroud. Hañvaloud a reent bezañ mignoned, hep mui. Eüruz e oe ar vamm o weloud ar hemm degouezet e buhez he merh karet. Med ne gomprenas ket abegou don an darvoud-se. N'helle ket o hompren.

Distrei a reas gwreg an Aotrou d'ar gêr goude dispignet ganti heh oll arhant. Pa veze paour-rah, en em ziskoueze hegaratoh e-keñver he gwaz. Med, prestig adarre, e trehe he zemz-spered kintuz hag e rahoane diwar-benn bitrakou. Eveljust, ne jome ket da labourad en he zi ; nann, filstillerez e oa dreist-muzul hag ez ee da di he hamaradez da varbillad ha da hrozmolad eneb he gwaz.

Ne oe ket pell, evelato, o verzoud e oa cheñchet eun dra bennag e buhez he den. Bez' e oa hemañ sederroh, sonnoh e gorr ; kanañ a ree aliez. Hag hi da glask ar rag hag ar perag.

Kavoud a reas en em blijie muioh e ti e amezeged eged en e di e-unan. Neuze e stagas da glemm, da rebech, da grozal, da fulori, da skei gantañ, zoken.

Med ne responte morse ; gouzañv a ree hag en em frealzi o soñjal en digoll a reseve bemdez digand e gare-dig vihan. Homañ a verzas koulskoude e oa krog he

mignon da gouezañ, eur wech ouspenn, er boan-spered. Glaharet e oe evitañ ; hag eviti ivez rag ar vaouez droug, ar geben-ze, a yee bemdez da gerhad he gwaz, war-lerh e labour, beteg e vureo.

Eun devez, e lavaras Neig dezañ : « Ne welan nemed eun tu da gaoud ar peoh !... — Pehini ? — a houlennas-eñ, diskredig — Feiz ! mond kuit on-daou, pell ahann, ha bevañ a-gevred beteg ma skuizo ar vuhez en on hreiz ! »

Souezi a reas-eñ ; med e zaoulagad a lugernas. Digeri a ree-hi, dirazañ, eun hent nevez, ledan, splann, leun a esper. Ya ! med penaoz en em gemer da zeveni eur menoz ken espar ? Dre forz klask ha prederiañ, e kavjont eun dirouestl d'ar gudenn. Divizoud a reas Neig goulenn eur plas en eun ti-post, pell diouz ar vro e-keit-ha ma vefe-eñ oh ober e zeiz gwellañ evid beza dieubet diouz e garg. En askont d'e vloaveziou brezel e-noa ar reiz da vevañ diwar e leve.

« Labouret em-eus va gwalh ! — emezañ — evid kaoud ar gwir da ziskuizañ ! — Gweloud a ri ! — a lavare-hi — pegen eüruz e vim ha pegen buan e teuio adarre ar yehed en on gwazied ! »

A-benn c'hweh miz bennag e oe aozet pep tra. Poan-spered he doe ar plah yaouank o kuitaad he mamm ; med red e oa dezi heuliañ he flanedenn.

Lohañ a reas an daou garedig evel dre-laer. Pa bignjont en treñ ha pa guitajont ar porz-houarn, e soñjas gante edo eur houlz-amzer nevez o henel evite o-unan, splannoh eged an hañv, kuñvoh eged pep douster.

Laouen en em gavas-eñ evel eur bugel o kuitaad ar skol pe eun den, bet toullbahet pell-amzer, o tond er-mêz euz ar prizon.

Moushoarzin a reas dizehan o selloud gwech ouz Neig, gwech ouz ar mêziou. Kemmet e oa penn-ouz-penn.

Neig, hi ivez, a oa eüruz ; a-wechou, evelato, e chome dic'hoarz oh en em houlenn hag-eñ na c'hoantafe ket ar wreg dilezet ober poan deze. « Pell e vim diouti ! » a lavare-eñ evid he frealzi. Skuizet e oant bet dreist-muzul gand an darvoud-se. Red e oe dezañ chom eun toullad deveziou en e wele. « N'eo netra ! » a lavare, en eur farsal.

Padal he-doa adkroget Neig gand he labour. Faez e oa ivez ; med stourm a ree euz he gwellañ. Felloud a ree dezi, hi, an hini yaouankañ, derhel penn. Kemer a ree eur blijadur divent oh aozañ pep tra en-dro dezañ. Bez' e oa evel eur glañvdiourez ; hag e savas lorh en he hreiz.

Mad e oe, eta, d'eun dra bennag er vuhez peogwir e sikoure eun den evid e bareañ ; hag an den-ze e oa heh

hini ; he faotr, he breur, he hamalad, he zad ; e berr gomzou, eur gwaz.

A-benn eur reuziad, e oent adarre en o flomm hag e krogas evite eur vuhez damheñvel ouz an hini o-doa huñvreet ; leun-barr e oa o halon ha sioul o spered.

Tremen a reas an amzer hep ma santfe Neig an disterrañ poan en he hein ; kreñvoh e teue da vezañ ; lartaet e oa ; ront e oa he dioujod ; kanañ a ree dalhmad. Mond a reent o-daou da vale goude koan pa veze dous an amzer.

E-keit ha ma veze-hi en he bureo, ne jome ket eñ e dreid en hevelep botez. Aozañ a ree ar predou, nêtaad an ti ; ober ar hefrediou. Santoud a ree, eñ ivez, ar yaouankiz oh en em zilañ en e gorv...

Eun devez m'edo o tiskuizañ en e gador-vreh, war-lerh eur valeadenn hir, e lakaas palv e zorn war e dal ; eur c'hwezenn o oa o pizennañ dioutañ. Gweloud a reas Neig, kerkent, e oa fall he heneil. Med ne lavaras ger.

Antronoz veure, e savas-hi abretoh eged boaz evid seveni ar pep pouezusañ a-raog mond d'he bureo. Soñjal a ree-eñ, en e wele « Arsa ! petra 'ta a c'hoarvez ganin ? Kredi a reen edon o wellaad ; ha bremañ e seblant va nerz steuziañ adarre ! »

Gouzañv a ree e spered o prederiañ diwar-benn ar gudenn-ze. Red e oe dezañ chom en e gambr hervez ali ar medisín. Med prestig, n'hellas sevel.

Goulenn a reas Neig eun ehan-labour evid ober war e dro. Spi he-doa d'e zavetei. Eun nozvez, avad, p'edo o hedal, e kavas e-noa poan-kaer o tennañ e alan. Sevel a reas, spouronet-kenañ, evid rei dezañ al louzou red...

Antronoz, ar mezeg a gredas rei dezi da gompren n'ez afe ket pell ken.

Kastizañ a reas Neig bemdez muioh-mui. Ne zebre ken. Med chom a ree en he daoulagad eur sked a lakae war zremm an den tohor bannou ar goanag. Pokad a ree dezi ha flourañ he bleo gand karantez.

Siwaz ! eur beurevez e welas fraez na badfe ket pell e dremenvan hag e lavaras da Neig : « Prestig e kuitain ar vuhez. Eüruz on bet eun toullad miziou ez kichenn. A-drugarez dit em-eus bet ar pez edon o klask abaoe va yaouankiz ; eur garantez wir, klok. Pok din, va Neig vihan, va aelig koant ha dibar... »

N'hellas ket mond pelloh gand e gomz ; kouezañ a reas e benn war ar goubenner... Maro e oa !...

Krog e oa bremañ an heol da zilañ adarre bannou abaf ar mintin a-dreuz da oueliou ar prenestr...

En deiz war-lerh, o weloud na oa tamm trouz ebed en ti, e teuas an amezeien da skei ouz an nor. Ne oe ket respontet deze.

Neuze e oe digoret dre nerz.

Eun daolenn, glaharuz ha tener war eun dro, a oa dirag o daoulagad : an amourouzien a oa astennet an eil e-kichenn egile, e sioulder ar maro, gwenn-kann o dremm evel al liñseliou hag eur moushoarz a levez war o muzelloù.

Eet e oant da anaon evel daou houlou lutig.

Ur gomz araog krog...

Mechal er gwerzeu-man skriüet tri-ugent vlé-zo, hag ind o-do eid er yaouankiz a vremen ur levezon bennag? Ha kaoud e hrei er ré yaouank un tamm bourrusted doh o lénn? En arvar eh onn.

Nag a gemm e zo étre en dud yaouank a hiriù en dé ha ré e véüé boud e zo hantér hant vlé! En amzér-sé éh oé gloèu en deverranseu eidom-ni, tud a-ziar er mézeu : er labour stegabl én un dachenn e geméré or horv hag or spered. Rag-sé en distérran neüéted e vezé digeméret genem ged er leüéné vrasañ.

En euredenneu de valardé, er pardonieu bredieh, er filajeu d'er gouiañù e ré en tu dem d'en em dolpein ha d'en em stardein étrezom, èl breudér ma oem. Karanté e oé én ur haloneu en eil eid égilé ; en em sekour e hrem, ne vern eid péh labour. Hag a pe zigouéhé en dé de dagein en Hoh lard én un dachenn, é vezé goulennet er hoazed ag er hornad eid obér ar dro er lon. Arlerh en hadereh er liésan. Kant tra e oé de bourvé er mitin-sé : koed de zastum eid bèrùein pilligadeu deur de ziranein er lon, ur vrich eid en astenn, er herdad eid er stagein. Er vugalé ind eüé e dosté, med dohtu a pe wélent en hoh braz ahetet ha staget ar é dron hag er bosér doh er labourad é rédent de guhed én ur harrdi, stanket mad o diskouarn ged o bizied, rag eahuz e oé er blemmeu ! Ur bedél koed étre hé daou zorn, er vestréz a cherré perhuéh mad er goèd : goedigenneu hweg ha dru e vo groeit getoñ.

Kent diranein er lon, é kouvié mestr en ti oll er hoazed de dañoad er chistr, hag é penn er fust braz é tivizent a ziar en Hoh, a-ziar é bouézaj, a-ziar é vuhédigeh, hag a-ziar é varù. Euruz e vezent é chonjal é vehé bet ér charné! kig hweg ha sal eid en tiegeh abéh épad meur a viz.

Un taol béh e vezé hoah é krougein er pémoñ doh un treust sonn ; ha neuzé é keméré er lahour é goutell vraz eid en digor, hag éh è er merhed ged er boelleu d'en deur réd de holhein mist er goedigenneu. Med kement-man ne oé nameid labour, komzet dein ag er pred e vezé en dé arlerh ! Kavein e hreet displéget gwir ha braù rol er pred-sé ér werzenn-man, mar karet hé lénn.

Plijadur em-es bet mé doh hé adlénn, ha reneùéet hé-des dirag men daoulagad taolenneu em-boé marsé ankouéheit. Spurmantet em-es ind endro hag en em gavet em-es, eid un herrad, é fest en Hoh én un dachenn. Nag a dud tolpet éndro d'en daol hir, er penn anehi harpet dod ur fenestr strih ; nag a larereh kaer, nag a hoarhereh ! E skourr doh en « tremaillé » é vèrù er pod houarn adreist ur gohad tan, ar en oéled, é kaotérieu braz ha bihan éma er solsis hag er hig rost. Na frond hweg e zo geté ! Mestréz en ti, en hé saù èl berped, e chervij er pred, er mestr é lein en daol e ziviz hag e ziskarg chistr, heb dihan, é gwér en oll. Er vugalé é lost en ti é hoari étre pèb bégad. Na leùéné e zo ged en dud-sé ! Kement, ma kleùan ur penn sonenn é tarhein ér penn arall, ha, kredet mé, seùel e hrei un dro koroll genem kent en em zisparti : rag èlsé éh achiù d'er liésan er festeu moh.

Kustumeu vad mem bro, kendalhet de véuein émesk me henvroiz koh ha yaouank ér leùéné hag ér garanté.

PENN LOUED.

N. B. — Ne oé ket bet skriùet er werzenn-man, a getañ, de voud embannet. Saùet e oé bet, aveid farsal, de voud lennet un dé bennag, doh taol er voéz vad-hont, F.G. a Lokunél é Lann-er-Stér, dirag er gensortet tolpet en dro de bred bourruz Fest en Hoh.

Gérieu diéz. — Tetah = nom particulier du cochon.
 Pedel, pel = jatte.
 Buhigenn = vermisseau.
 Groeit-er-hroeit = bien décidé.
 Koll-méh = effronté, éhonté.
 Badaùet = ahuri.
 Semplet = évanoui.
 Bobion = bavard, nigaud.
 Divredet = irrité.
 Bégeu miteu = milzin.
 Minell = huib.
 Kerhon = ver de charogne.

Tetah

*Roué rouanteleh er Moh lard
 Hag Aotrou oll er Perhell bihan.*

Gwerz deverruz eid
 Fest en Hoh

*De F. G. é koun a festeu moh
 bourruz Lok...*

Krénein 'hra me halon, koll e hran me anal,
 Gozig éh on semplet a pe za dein chonjal
 Em-es lakeit ém fenn, mé, ur goh buhigenn,
 Brudein ur Roué ken braz ar men distér Telen.
 Emen éh oé me fenn en dé em-boé leusket
 Ur chonj ken diaviz de zond é me spered ?
 A p' em-behé ahoel gelloud er Varhed koh ;
 Pe ouichen kanal èl ma hra er penmoh,
 Neuzé ne zoujehen komz deoh ag en Hoh-Roué ;
 Meulein é vadeleh, brasted é larganté.
 Med groeit-er-hroeit ' en traou, doujein ne chervij ket :
 Diskarget é en dram, red e vo en éved !
 Dam enta, me zelen, ha dam a galon vad,
 Mar bé stard el labour, er Roué er péo mad.

Kent-kan

Ar ho saù, o Breihiz ! Brudam a vouéh ihuél,
 Brudamm Tetah, Roué er Moh lard hag Aotrou er perhel !
 Ho ligné, o Tetah, zo ken koh èl en douar,
 Hag ataù, ér bed-mañ, éma stank ho tud kar.
 Éh obér el loned, Doué e laras un dé :
 « Revo moh ar en douar ! » Hag abenn hwi e oé.
 Er vuhé oé énnoh ha kentih, én Eden,
 E' hreh un dro balé én ur son ho sonenn.
 Neoah on tad Adam, én ur gleùed ho pouéh,
 E laras d'or mamm Èv : « Mechal, moéz, péh koll-méh
 « E gan ken diharag, e gas ken braz safar ?
 « Henneh nen dé ket groeit eid baradoéz en douar. »
 Ha éañ ar hoh arbenn eid obér deoh taùein,
 Pé moned d'ur vro all, hoh unan, de sonein.
 Med, p'ho kwélas é tond, ken digás, ged ho hent,
 En ur rodein ho rêvr, én ur son dré ho tent,
 É chomas badaùet ! Neoah, 'benn un herrad,
 Adam gavas endro é benn hag é skiendvad

Hag é brehoneg mad (rag er hetañ lavar
 E zeskas Doué d'en dén p'el lakas ar en douar
 E oé er brehoneg), é brehoneg gwirion,
 Eañ oeit ha laret deoh : « 'Men éh et. bobion ? »
 Med hwi, atañ digâs, hwi zalhas de zoned,
 En ur ganal kriùoh, trema Adam souéhet :
 « Hoh ! Hoh ! Hoh ! » e hreh plén. Ha chetu difredet
 Or hetañ tad Adam. A herr, éañ d'ho kaved,
 Ha èl ne oé ket hoah deit er mod divalaù
 De sinsakreïn anù Doué — er péh nen dé ket braù —
 Adam e dostas deoh ha ged ur vouéh goal dêr :
 « Mil ! Divil ! Tré ! Didré ! ar me hoh dislaùér !
 « Petra glaskes amañ ? » — « Hoh ! Hoh ! Hoh ! Hoh ! Hoh ! »
 E respondet dallmad. « Ké araog, tamm penn-hoh ! »
 Emé Adam ged nerh én ur zisplég kentéh
 Ur pikol taol botez 'n ho tiardran dibéh.
 Penn-hoh éh oh bet hwi en deùeh-sé anùet
 Hag elsé hoh anùér én or bro-ni bepred.
 Med, ged en taol, ho lost, kriet un dizanspoér !
 'N em dennas. kamm-digamm, avel un distéfér ;
 Hwi skroenjas ged en droug ha ged er véh eùé,
 Hag e zistroas chifet doh mabdén didruhé :
 « Keu e zeï deoh, Adam, d'er péh e hues groeit dein ;
 Un dé é vo grès deoh me haved d'ho mageïn. »
 Med Adam, disprizuz, e heijas é ziskoé
 (Èn amzér-sé éh oé é kreiz el leuiné)
 Ha deoh e eilgurias, én ur hoarhed, goapér :
 « Eid più, mar plij genis, e-tes hoant d'em hemér ? »

Elsé, barh en den, é komansas eidoh,
 Èn ur zoned ér bed, ur vuhé a valloh,
 Ur vuhé a hlaha ha karget a boénieu.
 Disprizet ged en oll épåd kalz a vléieu,
 Hwi viùas ér hoèdeu, pell doh safar er bed.
 Neoah, un dé, mabdén diskaret d'er péhed
 E zigouéhas dehoñ tremén étal ho ti.
 Brèuet ged en ankén, goasket d'er gerteri,
 Klaskein e hrè ul lon hag en-dehé gellet
 Donikaad ha desaù ged distér poén ha boued,
 Hag en-dehé neoah, én ur berrig amzér,
 Reit dehoñ ur biùans éz de houarn ha tinér.
 Med kaer en-doé redeg, kaer en-doé tourhellad,
 Ne gavé 'med unan hag en-doé é hrès-vad.
 Tetah, hwi oé henneh ! Hwi e choéjas mabdén
 Eid pellaad azohtoñ en nan hag en ankén.
 Deusto d'é rondon skoeit ha d'oll é zisprizans,
 Genoh, Roué er Moh lard, é kavas é viùans.
 Aboé en amzér-sé e hues dallmad biùet

Tostig tra de vabdén ha getoñ istimet.
 Seul mui m'hoh anaùé, ho prizé gwel-der-well,
 Hag eid hoh inoureïn é tislégé é duel.
 Un dé, neoah, ér vro, chetu deit un nebed
 Tud e hrér anehé er Fransizion, me gred,
 Direspet eid peb tra ; ur sord bégeu-miteu
 E gub o faosoni ardran ur yoh ardeu.
 Muioh ho tisprizant eged ne hré Adam :
 Méh o-des ag hoh anù èl m'o-des ag ur bramm !
 Chanjet o-des éañ mem diù wéh é léh unan.
 Hag a pe za dehé komz ag en dud lousañ,
 É larant ged bégeu : *Sale comme un cochon !*
 ... Petra glaskéet hwi ged tud ken digalon ?
 Ne ouiant ket, tud sod, penaoz ho mantell sei.
 Deusto dehi boud louz ged er fang pé en teil,
 E zeï de voud gwennoh, kaerroh eged o ré
 Edan deur ur barrad diskennet ag en né !
 Ur rummad tud neoah e zalh d'ho inoureïn,
 Me larehé deoh mem é talhant d'ho kareïn.
 Gouied e hret o anù — oll en dud en anaù —
 Adal kér Panama tré betag borh Sarhaù :
 Più n'en-des kleüet komz ag er Vretoned ?
 Genem enta Tetah éh oh atañ kareit.
 Mar groam deoh, peurkêh lon, tammen poén gwéhavé,
 E vé eid diskoeïn deoh, splannoh, or haranté.
 Barh er foérieu, gwir é, a pe veh bihanig,
 Eid ho tiskarg, liéz, e kroger 'n ho lostig ;
 Ha gwéhavé eùé, tud digalon e chonj
 Ne veheh avod heb un huib én ho monj ;
 Bouteïn e hrant, tud kri, ur minell én ho fri,
 E vehé adrèsoh liéz én o hani...
 Med ne vern ket, Tetah, digollet ' veh goudé
 Hag eid un distér boén, boued dru ho-pé bamdé.
 Ne vennis ket komz hir ag en Ankeu spontuz
 E za grons d'ho tiskar a pe veh ken euruz ;
 Rag ahoel, saùetoh eged kalz a rouané,
 Ne wélet ket élté kousiet ho puhé
 Ged tregaseu er Stad ha peb sord treisoni,
 Penn fall ho sujité, poénieu er gohoni.
 Yaouank Flamm é varüet, ar un tron e lakér
 Ar é héneu, ken braù, aveid ho tigemér.
 Komzam kentoh bremañ ag en oll inourieu
 E zakorér, Aotrou, d'ho kig ha d'ho poelleu.
 Rag èl rouané en dud ne veh ket hwi kaset
 De zèbreïn d'er gerhon de doull don ur vèred...
 Kentih a pe veh marù (er moh ne grevant ket !)
 Un dén anùet Tagour, ar vancheu é roched,
 Ur goutell 'tré é zent, 'n em laka d'ho kampenn,

E droh hag e zidroh, én é veg ur sonenn.
 En tiegeh abéh, mamm, tad ha bugalé,
 E fich hag e zifré, e labour pad en dé
 Aveid malein ho kig, obér ged ho pœlleu
 Ur bern goëdigenneu, solsis a roltadeu.
 Aveid aozein peb tra ha kampennein er pred
 E vo, d'er ré ho kar, 'benn disul chervijet.
 Kérent ha mignoned d'ar friko e bedér,
 Hag en Aotrou Person, liéz en Aotrou Mér.
 Tosteit bremañ, Breihiz ré vihan ha ré vraz,
 Er baotred, er merhed, er hihier hag er chas!
 Tud! azéet doh taol; hwi, kihier, édanti;
 Pato ar gorn te rèvr, flut-té é kreiz en ti...

Sonenn er Soubenn

Chetu er soubenn fresk : brañet un daoulagad!
 Lan int a vraüité. Daù vo dem hé zañoad...
 A soubenn hweg en oll e zo goalhet neoah;
 Peb unan e vreges : inour deoh Roué Tetah!
 Er hig soubenn, arlerh, ar en daol e gasér,
 Ha chistr melén èl koér, ér gwér e ziskargér.
 Bremañ ne gleür mui 'meid trouz er chajelleu
 É chakein, é valein er pikol bégadeu,
 Hag èl ma faot dalhmad, eid obér labour vad,
 Ivlein er mikanig, er ré-man a bodad,
 E lonk er chistr stanket!

Med nag un hwéh bourrapl
 E za bet men difrenn! Péh skuermereh dalhapl
 E sko men diskoharn? Tetah, nag ur safar!
 Na moged! Na traou dru, roltet én ur plad douar!
 Diwisket ho tokeu ha saludet genein :
 Chetu er péh e hré d'er hihier miañouein,
 Chetu penn-kaoz er frond e gaven mé ken mad :
 Goëdigenneu Tetah zo é tond ar ur plad.
 O, nag a leüiné e wélér ar beb fas!
 Deurrennein 'hra en dent, peb unan 'skarh é das;
 Er hihér 'red, e harm, e saù plom o losteu,
 Hag a héneu Pato é kouéh riolenneu...
 Diazéet er plad, peb dén e denn d'é du :
 Ma ne douch fonnaploh, er Mér e zo... foutu!
 Ne chom mui ar en daol 'meid er hoëdigenn vraz,
 Ken tiù avel en « diaoul » e vé ar en hent-braz!

Eañ grog énni, neoah, hag e droh éan en tamm,
 E oé bet flourikeit ged botéz koed Adam...
 Ne vern, hama, Tetah?...

Sellet dohtë bremen
 E tèbrein, é teviz... Er vestréz e houlen :
 « Hama, mad int, goazed? » Abominapl, komer,
 « Biskoah matoh, nann dam! » emé en Aotrou Mér,
 En ur dorchein é veg. En oll d'obér èltoñ,
 Rag dru é o divéz, ken dru èl er balon!
 N'en-des nameid unan, mab Beltram Kérvalé
 Hag e zalh de zèbrein. Deit é ag en armé,
 Hag aveid 'n em gaerraad en-des gouarnet bremen,
 Edan é doulleu fri, tèt pé pedèr bléuenn
 Haval doh ré é gah. Chetu perag hiriù
 E chom staget dohtë traougeu a beb liù...
 Oll en traou-sé, Tetah, aveid hoh inouren!
 Med er solsis frintet e zo hoah de zèbrein,
 Hag er fromaj eùé... Goarekaad e vo red,
 Rein amzér de zeval, lared kaer un nebed
 Araog moned grèsoh.

Neoah étal en nor
 E kleür é huchal. Petra? Dam de zigor :
 « N'es ket pilieu, mar plij? » Ha! Ha! Kato er Floh!
 Honneh eùé, Tetah, en-des sonj ahanoh;
 Eid daou pé tri mouched ledan èl un dantér,
 E hronno én hé sah ho ran gwenn ha tenér.
 En or bro-ni, hwi wél, Tetah, o roué heb par.
 En oll braz ha bihan, peur ha pinùig, ho kar.
 Più hellehé kásaad un Aotrou ken frontal
 Hag e zakor bepred er mad aveid er fall?
 N'ho-pé meid restajeu, er biùans truekan,
 Ha neoah, a zistro, é ret er hig hwékan.
 Reveet benniget!

Gwéhavé, ér bed-men
 (Ag en dud é komzan), pe za d'ur roué tremén,
 É larér, mar bé bet un dén madeleñuz,
 « Henneh oé ur roué mad! » Pesord komzeu bourduz!
 Più er goér, laret dein? Er preñued martezé...
 Tetah, n'en des meidoh, é touéh oll er Rouané
 E hellér anehoñ lared éh oé roué mad,
 Rag hwi hebken, Aotrou, e hell en dén tañoad!...

LOEIZ HERRIEU, *Huavrér*, 1907.

YANNIG SKOLAN

C'HOARI MANTRUZ E TRI ARVEST

C'hoarierien : KATELL, mamm Yannig Skolan, deg vloaz ha tri-ugent.

KAZ DU AN TI, eul loen braz hag iskiz.

SPES YANNIG SKOLAN, dindan everiañs eun den tregont vloaz.

AR PAERON, eur houer eet war an oad.

Ar c'hoari a dremeno penn-da-benn en eur penn-ti paour annezet dister gand eun armel, eul listrier, daou wele-kloz, eun orolaj hag eun daol-voued, eur skaon a beb tu dei. E peb penn d'an oaled, eur skaon da domma ouz an tan hag, a-uc'h dei, eun drezenn en istribill. War eur stal, ouz mantell ar ziminal, eun nebeud skudilli pri gand eur grusif en o hreiz.

ARVEST KENTA

Noz eo ha diwezad anei. Neb goulou en ti, nemed ar sklerijenn a daol flammou eur gohad tan o tevi war an oaled hag a laka da bara dispis an arrebeuri koaret hag o mudurunou houarn spuret. Azeet eo Katell e korn an oaled, he fenn ganti etre he douarn ha skoelfet he daoulagad. Er-mêz e ren ar gwall amzer ha, beb eur mare, fouradou avel o tond dre ar ziminal, a ra d'ar flammou plada ouz an oaled hag a leugn an ti a voged.

KATELL (oh huanadi)

Petra 'm-eus-me grêt deoh, ma Doue, evid beza kastizet ganeoh en eun doare ken didrugar ? Ma gwall-gaset hoh-eus ken didruez ma 'z eo flastret ma halon ha ma ene ha ma 'z on eet d'an eurvar.

Ne hellan mui padoud gand an anken hag ar glahar ha gwelloc'h e vefe din beza er vered, dindan c'hweh troatad douar eged beza o houzañv, er bed-mañ, eur blanedenn ken reuzeudig ha ma hini.

Krouadur kaez a zo ahanon ! penaoz taloud ouz ar gwalleur iskiz a zo kouezet warnon ? Mez ha dizenor, setu, hiviziken, ma lod trubuiluz war an douar-mañ ! Heg e houlennit, Aotrou, habasketed ha sentidigez d' Ho youl a-berz ar re a heskinit ken dizamant ? N'ouzan ket petra a vir ouzin da vond ouz ar groug evid lakaad termen d'am doan ha d'am dizesper.

Daoust da beb tra, koulskoude, n'eo ket eet ma oll skiant vad diganin pa zoñjan e poaniou grizias rouantelez an droukspered. Eur follentez e vefe din, war zigarez tehoud diouz eur vuhez a rann-galon hag a hwervoni, en em daoler e gwasoh stad e-doug an oll amzer. Hag eno, ouspenn, e rankfen gouzañv ma mab milliget d'ober din kavandenn, eun dra dreist ma galloud warlerh ar pezh a zo bet c'hoarvezet. Biken n'am huitay ar zoñj anean, ken braz eo an euz a drubuill din ma herhenn !

Ganet em-boa eiz krouadur, oll ken koant hag aeled Doue, seiz merh hag eur mab, pa 'z eas ma fried diouzin da heul eur gwall gleñved. Rankoud a reas ar paour kaez devezourez 'zo ahanon labourad stard ha dioueroud ar peb reta ma-unan a-benn o sevel en nebeuta a zienez ma hellen. Bloaveziou hir ha leun a brederiou teñval betek ar mare ma teujont da veza gouest da hounid o buhez o-unan. An eil war-lerh egile ez ajont, ar merhed da zervija war ar mêz, hag ar paotr, ar wasa gwalenn a roas Doue din da houzañv, da zeski ar vicher gwiader.

Ar brasa kerse am-eus hirio a zo beza bet chomet heb mouga etre ma daouarn an haillon diaouleg p' edon oh e laakad er bed. Nag a zaelou hag a drubuill am-bije espernet neuze ! Kerkent ha ma oe barreg da hounid eur gwenneg bennag ha da skoazella ganto e vamm, eh en em daolas d'ar gwin-ardant hag e savas ennañ ar gwaso youlou. Eun den kaer ha korfet mad e oa ha, dizale, e plijas d'ar merhed yaouank a-ziwar dro. Hogen, e-leh dibab unan bennag da bried en o zouez, e oe treh ennañ e c'hoantegeziou diroll ha nousped bastard a hanas diwarnañ.

Allaz ! ne oe ket a-walh : pa dehas ar merhed fur dioutañ, e reas an orged deñ gwalla e zeiz c'hoar, hag heñ, dre zroukober pe dre e giriegez, a zo kablu ma 'z int maro o zeiz ha, d'o heul, ar vugale o-deus bet darn aneo.

Komz a-zoare ebed morse en e henou, netra nemed jarneou gouest da lakaad bolz an neñv da zizac'ha war e benn. Ne gile dirag neb torfed hag eun deiz e laeras eur halir aour, gand ar Sakramant a oa e-barz, da gas da baotred ar sabad, goude beza lakaet an tan en iliz.

Ha, ken gwaz all, ma leor bihan, an hini a frealze kement ma halon hag a skuille levenez em ene, a zo bet sammet gañtan ive didruez...

Salver Jezuz! en ho lezenn e hourhemennit da beb kristen ankouaad ha pardoni ar gaou a vez greet outañ. Yannig Skolan, ma mab, a ve re vraz e fallagriez evid ma ouezfen pardoni deñ. Gwelet em-eus e gas d'ar groug, dispont e zaoulagad ha glaharet e gerhenn, goude beza bet an absolvenn euz e behedou, digand eur beleg stoliet a ginnige deñ Ho kroaz santel da bokad. Me 'oar eo hoh absolvenn eur gwir bardon hag e hello, hivi-ziken, p'en-devo paet deoh e zle er Purgator, mond diwezatoh d'ar Baradoz, gand m'en-devo bet ive ma fardon.

Hennez, avad, n'en-devo biken, rag re vraz eo ma hasoni outañ evid dond da ankouaad e fallentez ha laouen e vin oh e zerhel da jahina gand an diaoulou en ifern.

(D'an ampoent e laka eun talmad gurun spontuz an ti da grena hag eur wezenn, tost deñ, da ziskara gand trouz. Katell a ra sin ar groaz, spontet oll, hag ar haz du, eul loen braz hag iskiz aneañ, deut d'an ti dre an toull a zo er penn izella d'an nor, a zo lammet war an oaled da heja e gorr gleb-teil gand ar glao.)

Gwerhez Vari ha c'houi, Santez Anna, he mamm zantel! Me 'grede edo ma zammig ti o koueza en e boull! A-drugarez deoh, ez on yah hā salo eur wech c'hoaz. Ma bennoz deoh, sentezed kaer, d'am beza gwarezet, evel boaz! Abaoe an deiz ma oe kaset Yannig Skolan d'ar groug, ne ehan ket an taranou da strakal, med hemañ, hep gaou, eo ar gwasal talmad a darzas biskoaz en tolead a-bez. Lavaroud a rafed emañ an amzer o c'hoari an diaoul hag e bevar, vel m'en-defe c'hoant da ziskouez e foug da geñver daonedigez ar brasa peher a zo bet morse war an douar.

(Ar haz a gendalh d'en em heja evid strinka dioutañ an dour glao ha, da houde, eh en em astenn, tost d'antan, da zehi. Evel diou hlaouenn veo, e par iskiz e zaoulagad war ar vaouez.)

Ahanta! loenig paour, eet e oas da hallohad hag ez out bet tapet dindan ar gaouad a zo o koueza a-varradou? Ma karjes beza chomet en ti, da waskedi, ne vijes ket bet glepiet evel ma 'z out. Bremaig e vo seh da vlevenn hag e helli adarre distrei da dargasa, evel ma ree kent Yannig Skolan, ar pitaouer daonet.

Med perag e sellez ouzin gand daoulagad ken entanet, e giz m'az-pije c'hoant da gomz, re bar d'eur hristen enkrezet o klask skoazell en e walleur?

AR HAZ

Miaou! miaou!... E gwirionez ne faziit ket, mamm. Me 'zo er boan hag en anken hag euz ho skoazell em-eus ezomm.

KATELL

(o lakaad sin ar groaz en he herhenn)

Aotrou Doue! ma Zalver benniget; biskoaz kemend-all! Ma haz eo a gomz hag a ra mamm ouzin? Teh ahann, loen fall, pe me da friko gand eun taol keuneudenn, rag ne hellez beza nemed an diaoul e-unan deut amañ d'am zouella!

AR HAZ

Na daerit ket, ma mamm, ha ma selaouit gand truez. Me eo ho mab, Yannig Skolan, deut davedoh gand aotre Doue d'ho pedi da deurel warnon eur zell trugarezuz ha da houlen ho pardon evid kement torfed am-eus greet. Bet em-eus pardon Doue, met hoh hini ive a rankan da gaoud. Anez e risklin, euz ar Purgator ma 'z on ennañ, e islonk dizeon an Ifern da leski a-hed kantvedou ar hantvedou, heb gweloud morse neb diwez d'am merzerinti.

KATELL

Loen milliget! e an hini eo a zeu da glak ma zrugarez, goude beza ma dantet ken gwaz? Ra 'z i da bul-luha e poull an orged hag an drouklaz, gand an drouk-spereou, da vignoned, beteg fin an oll amzeriou, rag arabad dit fizioud warnon d'az tiboania, na pa vefe e-pad eun devez hebken.

Pê da zle da ouenn mab-den ah-eus gwallgaset ha gwallskoueriet. Da bardon, emezout? Re vraz eo an drougou ah-eus greet evid ma teurvezfen pardoni. Del-lezet ah-eus ar hastiz, ha ma malloz am-eus taolet warnout.

Bremañ, kê kuit a-zirag ma daoulagad ha ma laosk e peoh!

AR HAZ

Eur predig c'hoaz, mamm, a-barz ma sentin ouzoh. Garo eo ho setañs, gwasoh eged hini Doue, ar mestr oll-halloudeg, a zo bet prizet gantañ ma selaou ha diskouez din E druez.

A-dra-zur, kabluz on ha kabluz dreist-goñvor, kalz muioh eged Kaïn, muntrer e vreur Abel. Nep den biskoaz n'eo bet ken sammet a fallagriez ha me, hen anzav a ran gand ar glahar hag an uvelded a zere ouz eur galon doñjeret.

P'edon em zoull-bah, chadennet ouz ar voger, hag o hortoz ma eur ziweza, e tiskennas warnon gras Doue.

Dre hir brederia e weljon grevusted ma faziou milliget hag eur morhed heb e bar ha don meurbed en em zilas ennon a-nebeudou. Neuze e oe anad din brazder ma fehedou divent hag e houlenñjon kaoud eur beleg da govez. An absolvenn a roas din am henneras da gerzoud d'ar maro, evel d'eun dieubidigez diouz ar vuhez a forban am-boa renet.

Ma gwelet hoh-eus, mamm, o tostaad ouz ar post-kroug, heb an disterra aon ha liou eun askre dizamm o para war ma dremm. Mervel am-eus greet, nann avad evel eur hristen war e wele, hogen gand eun ene sioul hag ar spi da gaoud, eun deiz bennag, an eürusted a bado da viken. Med, evid a vo klok pardon Doue, e tleit rei din hoh hini ha, daoust d'am fallentez, eh aspedan ho kalon a vamm d'hen ober.

KATELL (*gand eur c'hoarz-yud*)

Ya! mab an diaoul, da welet em-eus o sevel gand ar skeul ouz ar post-kroug, skoulm riskl ar gordenn o starda da hourlanchenn ranklez ha da deod binimuz o tond war-hed eun troatad er-mêz euz da henou gaouiad! Ha skrignet he-deus ma halon gand levez en-dra ma rede krenienn ar maro penn-da-benn da gorr a hagn flêriuz! Da ziweza huanadenn am-eus klevet ive, gand plijadur, med an dudi he-deus roet din n'eo ket bet evid distana ar gasoni a vagan hag a vagin ouzit bepred!

Na hortoz ket ma fardon, Yannig Skolan; ma malloz a zo warnout!

(*A-daol trumm, e tregern an ti gand eur c'hoarz skrijuz hag o sklasa ar vaouez. Oh ober sin ar groaz, e tirroll war ar haz.*)

Tav gand da c'hoarz ivern, loen diaouleg! Treuzet en-deus din ma herhenn evel eun taol kleze ha skignet ennon ken braz mantridigez ma ne vefe gouest den d'he displega gand komzou euz ar bed-mañ. Teh, loen ar sabad, ne fell ket din da glevoud ken!

(*Sevel a ra da bega en eur geuneudenn.*)

AR HAZ

N'eo ket me an hini en-deus c'hoarzet, mamm, med unan all c'hoaz droukoh egedon hag a zo stad ennañ oh ho kavoud ken aheurtet da zinah ouzin ar pardon a houlenñan diganeoh. Mouez Paolig eo, moarvad, drant deañ o kredi e kouezin etre e skillfou en abeg d'ho krizder em-heñver.

KATELL

Din eo e tamallez ma hrizder, drouklazer ha taner

didruez! Gortoz ma vo trohet berr da gomzou disme-gañsuz ha da hevier: dal ar hrog-yod-mañ da lipad!

(*Eur mell taol keuneudenn e tistag gand ar haz, o terri deañ e wal-gein. Da heul an taol en-deus laosket eur viaouadenn druezuz hag a drefu ar vamm.*)

KATELL (*skodeget hag o krena*)

Ma Doue! petra 'm-eus greet? Stravuillet on bet gantañ o skrijal ken iskiz m'en-deus lakaet eur jouadenn da dremen dreizon. Ne oa ket din d'e laza. Ar vuaneged broudet ennon gand komzou hegasuz al lastez a Skolan-se eo a vleinas ma dorn. Bremañ eo kollet ma logoter ganin ha kerse am-bo deañ ha kerkoulz hag eñ ne gavin ken.

AR HAZ (*o vervel*)

Gwall hanaz oh bet, mamm, ouz eul loenig dinoaz n'ho-poa neb abeg da laza pa n'eo ket eñ hoh hege, med ma ene en em zilet en e gorr, evel m'am-eus lavaret deoh dija. Kerkent ha ma vo maro mik an anevalig em-eus kavet repu ennañ, e kuitain e gorr ha ne zalein ket pel-loh d'ho chala. Hogen, distrei a rin adarre rag n'on ket den da goll kalon pa vez meneg ganin da dizoud ma mennad. Eur mennad hag a vern din seveni, anez beza dalhet da hirvoudi er gwsa poaniou a-hed ar beurbadez. Fiziañs am-eus ne doh ket ken kalet ha ma tiskouezit beza, p'hoh-eus bet keuz da varo ho kaz. C'houi a oar ervad eo nebeud a dra buhez eul loenig e-skoaz silvidigez ma ene.

Kenavo ahann da bell, eta! Warhoaz da noz e tistroin c'hoaz davedoh, mamm, ha plijet gand Doue ho kavin neuze gweloh stummet. (*Maro mik eo ar haz.*)

KATELL

(*eet a-nevez da azeza e korn an oaled*)

Talvezet eo bet d'eun dra bennag maro ma faour-kêz kaz, p'en-deus roet din an dizober euz ar fallakra euz ar vibien a daolas morse troad en douar. Ne vo ket evid pell amzer, moarvad, o veza ma 'z eo mennet d'en em gavoud amañ warhoaz da noz adarre.

Pebez abadenn stravuiluz eo bet houmañ, ma Doue! Ken braz kalonad am-eus bet d'he heul m' Ho pedan, Aotrou ma ne glewin ken al lakepod o klemmuskad din. Eet e oan gantañ d'an eurvar hag ez on ankeniet gand ar zoñj e rankin klevoud adarre an hevelep rantikou. Plijet ganeoh da rei din nerz a-walh da viroud ganin ar pardon a houlenñ. Ma 'z oh bet sempl a-walh, dre Ho madelez divuzul, da rei deañ dor zigor en Ho palez, eun deiz a vo, e falvez ganin e tamantfe d'e oll zrougou. Ne

vefe ket eun dra reiz lemel diwarnañ pouez e behedou, pa n'eus ha ne vo biken eur peher all par deañ.

En desped deoh, eta, Aotrou, e talhin kloz dorjou Ho Paradoz, palez an dudi hag an eürusted peurbaduz. Grit ma ne vo ket kement-se eun harz da dizoud, pa vo deuet ma zro, an eurvad a hortoz pep kristen dinoaz war-lerh e dreiz er bed stravuilluz-mañ.

Hogen, seul-vui e soñjan e gwalloberou ma mab, seul-vui ive e kresk outañ ma drougiez ha ne ehanan da lavaroud : Ma mallez ' zo war Yann Skolan !

(Savet eo Katell da gafuna al ludu-broud chomet e dilerh an tan.)

Diwezead eo ha deuet ar mare da vond da gousked. Siwaz ! tehoud a ra ar housked diouzin ha bepred e vez digor ma daoulagad e teñvalijenn ma gwele-kloz. Ma ne ziskuiz ket ennañ ma spered, prederiet bepred gand soñjou ha skeudou skrijuz o tigas eñvor din euz buhez direol ma mab, e kav ma horv ha ma izili, brevet gand al labour, gras gourveza ennañ.

Med, nag hir e vez an noz ! Nag a amzer a gavan da huanadi ha da hirvoudi ! Gand ar brasa mall eo e hedan tarz an deiz ha, kerkent ha ma houlaou an oabl, e vezan war-zao da genderhel, em hozni hag em gwalleur, gand ma stad truezuz.

(Enaoui a ra eur houlaouenn.)

Heb goulou ne welfen ket sklêr da ziwiska ma dillad ha da vond d'am gwele. Esoh ive e kavan ma fedennou da lavaroud pa ne vez ket teñval-sah en dro din.

(Goude beza soubet he bizied en dour benniget a zo en eur piñsinig stag ouz ar gwele-kloz, e ra sin ar groaz, e-serz daoulina war al leur-zi, dirag ar grusif.)

En ano an Tad, ar Mab hag ar Spered Santel, evel-se bezet greet.

Ma Doue ha ma Hrouer, Ho pezit ar vadelez, a-raog peb tra, d'am diwall diouz touellerez ma mab dihrad deuet da glask ober din kredi en-deus bet Ho pardon ha ne hortoz bremañ nemed ma hini evid beza salvet.

Ar Justis a houlen kastiz d'an torfetour didruez ha ne vefe ket reiz rei levenez an Neñvou d'ar gwasas krouadur a hadas kement a zroug en dro deañ, o wallskoueria e nesa hag o lemel digantañ buhez ha brud-vad.

Grit, eta, n'em-bo ket ar zempladurez da zistrei war ar malloz am-eus taolet war ma mab Skolan. Amen.

(Da houde e kendalh gand he fedennou boaz.)

Amañ eh echu an arvest kenta.

EIL ARVEST

E ti Katell, evel an derhent, ha diwezead diouz an noz. Tavet eo bet ar gorventenn ha sioul eo peb tra er-mêz hag en ti. Tan a zo war an oaled ha dirazañ, evel an neizour, ar vaouez o tomma, e-serr dibri soñjou. Dihoulou al leh.

KATELL

Didrouz an tolead a-zindan-noz, peadra da ziskuiza ha da frealzi ma halon weñvet. etra ne glever o tond euz ar-mêz nemed, a-vareadou, mouez ar gloud hag hini ar gaouenn o klask o boued dindan an oabl teñval.

Eo, koulskoude, du-hont er peñlder, trouz eur marh o tond d'an drip war an hent braz. Piou, d'an ampoent, a hellfe beza o redeg bro en takad-mañ ken digavan-denn ?... War frêsa e seblant din klevoud hern al loen o steki ouz ar vein. Pa 'z eo dall an hent a zeu d'an tirmañ, e tle beza ar marheger war glask ahanon... Gand ma ne vo ket Yann Skolan, ma zregaser o tond adarre d'am zrubiilla, evel m'en-deus prometet ! Nann, moarvad, rag n'emañ ket ar hiz gand an tasmantou da varhekaad war gezeg veo ha da gemenn o donedigez gand kement a drouz. Ma 'z eo eñ an hini eo, ne zigorin ket deañ a-briz ebed...

(Tri daol a zo bet skoet war an nor.)

YANNIG SKOLAN *(o hervel euz ar-mêz)*

Ma mamm, digorit din an nor :
me am-eus ezomm euz ho skor !
Me ne houlenin diganeoh
netra nemed eur gomz a beoh.

KATELL

Ma dor ne vo ket digoret
d'eur hristen bet en em loret
gand gwasas torfedou 'zo bet
sevenet morse war ar bed.
Skolan, dit-te ma malloz ruz,
ha prim ahann teh kuit d'an tuz !

SKOLAN

Ouz ma ene, truez, ma mamm ;
da houde ne zalein tamm.
En abeg d'ar wall-enkadenn
deut da heul ho milligadenn,
ouz ho mab kêz, ar hoz haillon,
na zinahit ket ho pardon.
Keuz braz en-deus d'e wall vuhez :
en an' Doue, outañ truez !

KATELL

Dit-te ma dor ne zigorin
ha ma halon ne ziglorin
da bardoni gand trugarez
d'an nep d'an diaoul 'roas arrez.
Ma mab Skolan, me an-eus mall
da houzañv pirm d'ar bed all
da houzañv 'pez a zellezez
e kavandenn an drouk-êlez.

SKOLAN

En desped deoh, me 'z ay e-barz ;
ho tor ne vo ket din eun harz.
Dor zigor m'am-eus goulennet
eo o veza ma oan mennet
d'ho touja, mamm, evel ma tle
ho mab divad 'zo en ho tle.
Me 'zo eun ene hag a oar,
pa vez teñval an noz heb loar,
treuzi peb dor bet moraillet
heb beza, sur, outi saillet.
bremaig souden e weloh sklêr
ez on ken tano hag eun naer
pa vo ma spered, marh hag all
en ti 'zarempreden gwechall ;
med gwell eo din kaoud ho mennoz.
Digorit a-youl vad henoz !

KATELL

Ne vefes gwell e tigorfen,
ha me ma le neuze 'dorrifen.
Rag-se ma dor ne zigorin
ha ma le-douet ne dorrin.

SKOLAN

Ho youl 'zo ken kalet ha dir
ha, daoust da gement-se, eo gwir
ez an d'ho ti, en desped deoh,
ne vern Petra ouzin a reoh.
En ano Tad, Mab ha Spered
a ren ar bed hag ar stered,
an Doue am gwarez ha skor,
ez an d'ho ti, a-dreuz an nor !

*(Dre vuzud eh en em gav Skolan, war gein e varh,
e-kreiz al leur-zi.)*

SKOLAN

Noz vad a hetan deoh, ma mamm, ha ma digarez a

houlennan da veza deuet daoust d'an divenn ho-poa
greet ouzin.

KATELL

Dre be sorserez ha gwidre ah-eus treuzet ma dor hag
hi sparlet ha moraillet, strobinner maro-ma 'z out.

SKOLAN

N'eo ket dre strobinnell on deuet amañ : eun ene dis-
tag diouz e gorr n'on ken hag, evel-se, divarrez d'ober
netra gand ar skiatou kuz 'nam-eus bet morse neb anaou-
degez aneo.

KATELL

Penaoz, neuze, heb skoazell an êrouant, ah-eus gellet
seveni eun dra ken marzuz ?

SKOLAN

Dre hras hag aotre Doue hebken ! Lavaret em-eus
deoh, mamm, en-deus pardonet din, p'am-bo diskouezet
deañ gwir glahar d'am fehedou ha d'an drougou am-bo
greet p'edon o veva. Hogen, evid beza salvet da vad, e
rankan kaoud diganeoh ho pardon c'hwi ive hag ho
lakaad da lemel kuit ar villigadenn hoh-eus taolet war-
non... Pa 'z eo an Aotrou ken trugarezuz em-heñver ez
on distroet davedoh gand ar fiziañs na vezoh ket evid
nah ouzin an alhwez a zigoro din dor an Neñv.

KATELL

Penaoz da gredi, krouadur Satan ? Du eo da varh ha
da zremm, ive, ken du hag an uzuill. Eur gwir vorian 'zo
ahanout, Skolan ! Ma vijes bet a-berz Doue, en-dije ske-
det da benn evel hini eun êl. Gaou, eta, e lavarez din ha
n'az kwelan-me nemed dindan everiañs kannad an Iver-
niou digaset d'am heskina ha d'am lakaad da zizaha war
ma zreid gand an doan hag an anken.

Pegeid e chomi c'hoaz da zond d'am spourana ha
d'am hegal, mab an Diaoul ?

SKOLAN

Pegeid, mamm ? E-keid ha ma plijo gand Doue ma
leuskel da glask tenerraad ho kalon kaledet gand ar
gasoni hag an droukañs ! E-keid ha ma pado ho puhez
er bed-mañ !

KATELL

Gwaz a ze din neuze, rag biken ken ne gavin peoh
didrevell d'am ene paour war an douar.

Ma 'z eo gwir, koulskoude, ar pez, a zisklêriez, e tleez
proui din gwirinded da gomzou, a-barz m'az kredin. Ped
Doue ma teurvezo gantañ lakaad anad din eo da zone-
digez amañ eur gefridi roet dit gantañ da ober, ha n'eo

ket traou ijinet ganit hag an droukspered d'am heskina ha d'am stravaga.

SKOLAN

Ha ma c'hoarvez kement-se, mamm, e lamoh ho mal-loz diwarnon ?

KATELL

Ne lavaran ket her grin. Me a ray ma mennoz da houde, evel ma plijo ganit. Kement-se, da vihanna, ne vo nemed etre Doue ha me hebken.

SKOLAN

Eun elfenn spi a roit din bremañ, mamm. Plijet gand Doue e vo ho parnedigez ken trugarezuz hag E hini !

D'am ambroug beteg ennoh, ma kavfen ma faeron, ar henderv gompas a zalhe ar Gozkêr gwechall, ha kredi a rafeh e teuan a-berz Doue ha n'eo ket a-berz an Diaoul ?

Ma faeron a oa eun den madelezuz ha leal. Pell 'zo emañ er Baradoz o veuli Doue gand or zent koz hag an êlez, goude eur vuhez poaniuz ha santel war an douar-mañ. E desteni a vefe a-walh deoh, emichañs ?

KATELL

Hep mar e kredin, neuze, e vo gwirion da zifreou, med ken sabetuet ha gwallskoueriet e vo ive da baeron gand ar govesadenn spiz a ranki ober dirazañ ma ne vo ket evid mond a-du ganit. Eun den leal ha santel, evel ma lavarez, e oa da baeron, ha ken skrijuz e vo da govesadenn da glevoud ma ne hello ket miroud d'az milliga e-unan.

A-hend-all, perag eo Doue ken largentezuz ez keñver, pa 'z out, a-dra-zur, ar falla ene bet barnet gantañ beteghen ? Eur hevrin eo din eur seurt madober.

SKOLAN

Ne oan ket dellezeg aneañ, mamm, hag e teree ouzin beza stlapet dizamant e strad an islonkou. Med furnez ha madelez an Aotrou a zo ken divent hag an douar, an heol hag an oabl ehon a-gevred ha, marteze, eo evid mad hoh ene em-eus bet frankiz da zond d'ho kavoud. O truezi war ma stad hag o pardoni din, evel m'en-deus greet E-unan, e kreskoh ho tellidou hag e skañvaoh dreizon ar poaniou ho kortoz er Bed all.

KATELL

Berr e vo ma foaniou, da vihanna e skoaz ar re az-po da ziwaska en ivern !

SKOLAN

Arabad deoh fazia, mamm ; ken gwaz, pe dost, eo tan griziaz ar Purgator hag hini an Ivern, ha ne hetan ket

deoh mond di, pell ahano, hag e vefe e-pad eun eurvez hebken !

Ken frank hag ar mor, frankoh moarvad, eo ar Purgator, leun-barr a geinvanou, a hirvoudou hag a houelvan A beb tu, e-kreiz tarziou tan o tizaha warno, eun niver estlammuz a eneou keiz, greet o zilvidigez ganto koulskoude, a houzañv eur verzerinti heb he far, a-barz beza gouest da nijal d'ar Baradoz. A-uz d'ar morad tan-se, taranou spouronuz o talma heb ehan, gwasoh eged oll beziou-kanol ha danveziou-tarza oll armeou oll rouanteleziou ar bed-mañ.

Ya ! diêz, evelkent, e vo ar predad hir pe verr a vo da dremen eno a-raog tizoud doriou Palez an Eürusted, eun dra hag a ouzon diwar skiant-prenet pa vezan, dalhmad, o leski er peg bero.

Setu perag, ma mamm, ho pedan da ziwall da zisplijoud da Zoue. E vennad a zo e vefen salvet gand hoh asant, padal, oh herzel outañ e tiskouezit ho prazoni hag ho puaneged, daou behed argaset gantañ kement hag ar re wasa ha gouest, evelto, da gas d'ar hastiz peurbaduz ha n'eo ket hebken da dan ar Purgator.

KATELL

Pa 'z eo ken braz mall Doue d'az savetei, perag n'az tiboagn ket diouztu, Eñ an Oll-Halloudeg ha mestr war gement tra ?

SKOLAN

Piou a zo gouest da gaoud anaoudegez euz soñjou Doue, ma mamm ? Eur gredenn a zo, e-touez an dud, ha ganeoh em-eus he desket. Setu-hi amañ. Neb piou bennag a vez bet greet gaou outañ a hello miroud ouz an drougoberour da gaoud an diskuiz peurbaduz, ma n'e zisamm ket, dirag Doue, euz ar fazi.

Ha klevet hoh-eus bet lavaroud e vije bet nahet, eur wech bennag, ouz eun dismegañser, an dizamm euz e wall, evid herzel outañ da gaoud e lod eürusted er Bed-all ? Nann, neketa, pa 'z eo ar Vretoned doujuz meurbed e-keñver en Anaon. Ha c'hwil hag a vefe trugarezuz ouz ene ne vern piou euz ho nesa, a harzfe ouz ene ho mab da dizoud an heveleb eurvad ?

KATELL

Eun teod lemm ha distagellet ah-eus, Skolan, hag eur breutaer a zoare az-pije greet er bed-mañ, daoust ma ne dout ket bet evid savetei da grohenn euz kastiz da varnerien. N'eo ket d'an hini kabluz eo da damall e grizder d'an hini en deus bet da houzañv euz e berz.

Da rebechou a gavan heguz pa 'z eo din hebken da

ober an dibab etre da zieubi da viken ha d'az telher er jahin a-hed an oll amzeriou. Ma tibaban kement-mañ evidout, me eo am-bo da respont euz ma mennad dirag Doue.

Pell a-walh on-eus tabutet ha breutaet evel-se hag e hourhemennan dit mond a-zirag ma daoulagad. Ma mal-loz am-eus taolet warnout ha n'on ket dare c'hoaz d'en em zislavaroud.

SKOLAN

Emaon o vond d'ho kuitaad, mamm; bezit dineh. A-raog, evelato, e fell din gouzoud hag eñ e tigemeroh ma faeron da drideg etrezoh ha me.

KATELL

Eun trideg, pa vez dibabet a-youl-vad gand diou gos-tezenn, a zeu da veza eun doare barner hag e ali war eur hrav a gemer stumm eur varnedigez a zo da veza sevenet penn-da-benn.

Da baeron, eta, ne vo ket trideg etrezom pa viran ar gwir da ober hervez ma c'hoant. Eur breutaer talvouduz a hello beza dit, avad, ha ne lavaran ket e chomo didal-voud e guzuliou war ar pezh am-bo divizet.

SKOLAN

Ra dalvezo din, eta, ar skor am-bo digantañ ha kenavo warhoaz, ma mamm. Ho pezit soñj e vo an deiz-se din hini an dieubidigez pe ar wasa daonedigez na hell den heti d'e falla enebour, heb beza dellezeg e-unan euz an heveleb kastiz. Rag-se, pedit Doue da deneraad ho kalon ha da skuilla enni an drugarez en-deus diskouezet din.

Kenavo, eur wech c'hoaz, mamm, ha Jezuz hag ar Werhez d'ho sklerijenno!

(A-daol-trumm e teu tasmant Skolan hag e varh da steuzia hag e chom goull al leur-zi.)

KATELL

Eet eo diouzin ma zregaser daonet hag ar stravuill a laka ennon. N'eo ket echu ma frederiou evelkent pa' z eo gwir nikun all nemedon en devo galloud da rei da Skolan e zisetez diweza.

Eun den mouchet a zo ahanon hag, em zeñvalijenn ne welan ket eur berad da zilenn an hent a dlefen ker-zoud gantañ. Beteg-hen mouez ar Justis, evel ma ' z eo meizet gand mab-den, eo he-deus bet an treh ennon oh ma bunta da villiga ma mab evid ma pêo e zle en abeg d' e behedou dinatur. Ha ne vefe ar Justis-se nemed frouez an droukrañs e-skoaz hini Doue kaled ha truga-rezuz war eun dro?

N'on ket evid soñjal, evelato, n'eus nemed sempladurez en Aotrou p' en-deus krouet eul leh a gastiz evid ar re a vez dizent outañ. Al leh-se eo a dalvez da zisranna ar re fall diouz ar re vad, ar pezh a laka anad ne dle ket beza lodeg anaon ar re genta gand anaon an eil rumm er haredon prientet gand Or Zalver evid an denelez dinoaz. Nann! ne hell ket Doue fazia p' en-deus bet ar furnez da verka spiz E emzalh dirag an Droug hag ar Mad. Piou, neuze, gweloh egetañ, a oar an drougiez a berhenne kalon vrein Skolan, an den ken denatur ha ken didruez? Dellezoud a ra hemañ ober ar grisa pinijenn e doug an oll amzeriou pa n' eus bet morse torfedou all par d'e re.

Ne gredan ket em-befe da gersea d'ar valloz am-eus taolet war ar gwallona den a zo bet biskoaz er stankenn a walleur-mañ. Ra chomo, eta, er gouelvan hag er skrign dent e doug ar beurbadelez, e keid ha ma vin-me, spi am-eus da vihanna, o veuli Doue er Baradoz hag o piaoua an eürusted didermen prometet gantañ d'an eneo dinoaz!

Hogen, pa zeu, beb eur mare, komzou Skolan d'am zrefui, ho pedan, Gwerhez Vari ha c'hwi, Santez Anna venniget, da zigloza din ma daoulagad ha da sklerijenno ma askre. Grit, mar plij ganeoh, ma paro splann dirazon ar weledigez euz an hent a dlean da gemeroud, hini ar pardon pe hini an droukrañs. Gweloh egedon e ouezit ar pezh a zo da zibab en digouez-mañ. Arabad deoh ankouaad, avad, e tellez an Droug beza kastizet, hervez lezenn reiz ho Mab ha Mab Bihan. Fiziañs am-eus ennoh hag e hortozan hoh ali gand ar vrasa doujañs. Evel-se bezet.

(Ober a ra sin ar groaz hag eh en em laka da zibuna he fedennou-noz.)

Amañ eh echu an eil arvest.

TREDE ARVEST

(E ti Katell adarre, diwezad goude koan. Emañ ar goziadez o tomma, evel boaz, dirag an tan, e korn an oaled.)

KATELL

Me ' gav eo yennaet an amzer hag e vefe mad din mond da geuneuta a-barz ma vo re galed ar goañv. E-leh chom ken diwezad da ludui, e tlefen mond abretoh d'am gwele pa ' z eo re fall ma gweled da helloud broedi. Arboell ma danvez tan a rafen ha ne vefe ket rivet ma hein pa savfen ahann.

An emgav lakaet gand al landibuill a Skolan-se eo a vir ouzin da vond da gousked. War-zao eh en em gavan dispontoh da respont dezañ hag henoz em-eus ezomm da veza divorfil-kaer e-kerz an abadenn denn on-eus da gaoud, ha kement-se seul-vui ma vo gantañ e baeron d'e skoazella.

E-doug an noz diweza, n'em-eus ket kousket eur berad, ken prederiet on bet gand ar zoñj euz ar gudenn a zo da zirouestla. Mennet on bepred da nah ma fardon ha, koulskoude, eur vouez kuz a zav ennon, beb eur mare, da damall din ma fenn aheurtet ha ma halon di-druetz. Ha mouez ar Werhez Vari ha Santez Anna, am-eus pedet o-diou d'am huzulia, e vefe hounnez ? Setu ma seblant din koll ma youl ha beza en arvar da fazia.

Asa ! trouz eur marh o tostaad a glevan, m-eus aon. Ar wech-mañ, n'eo ket d'an drip e teu, med gand ken braz tiz ma laka an douar da grenn. Divrall, avad, e rank ma menoz chom er pegad diweza, p'en-devo Skolan ennañ harp e baeron. Ha digeri a rin deo ma dor ?

(A-veh he-deus komzet ar vaouez ma wel, e kreiz an ti, ar marh du, daou zen warnañ, Skolan a-ramp war an dipr, hag egile a-haoliad war an tailler.)

SKOLAN

Noz vad deoh, mamm. Henoz n'em-eus ket goulennet dor zigor o veza ma ouzon ho-pije he dalhet sparlet. Ma faeron en-deus bet ar vadelez d'am ambroug beteg ennoh, ar pezh a laka anad n'eo ket a-berz an droukspered e teuan.

AR PAERON

(eur helhig skeduz gantañ en dro d' e benn)

Ra gouezo warnoh peoh an Aotrou da zienkrezi ha da sklerijenna ho kalon ! Gantañ on digaset evid ma kredoh e fell deaÑ e rofeh ho pardon d'ho mab reu-zeudig.

KATELL

Eur hras kaer, kenderv santel, en-deus bet aze digand Doue, hen anzav a ran. Ne gomprenan ket, avad, perag e vefe dieubet ma mab gwallon kentoh eged eur peher all dinoasoh egetañ, heb mar ebed, pa n'eus bet morse brasoh fallagriez e neb krouadur all.

AR PAERON

Ho mab, ma hiniterv, en-devoa diskouezet, a-raog mervel, ken braz keuz ha glahar d'e behedou, ma tleas Doue lemel o samm diwar e ene ha digeri da Skolan porz an Neñvou goude m'en-devo tremenet mil bloaz e tan ar Purgator. Eur hastiz kaled, evel ma welit, hag a dalvezo da zigoll or Hrouer euz an dismegañs grêt deaÑ gand ar peher.

KATELL

Sabaturet e choman dirag sempladurez Doue e-keñver grevusted an drougou a zo e kiriegez Skolan. N'eo ket mil bloaz Purgator en-deus dellezet hemañ, pa dlefe leski da viken e goueled Ivern Satan. Ma tle Skolan kaoud ma fardon evid beza kavet glan a-walh da vond d'ar Baradoz, goude mil bloavez Purgator, e tisklerian deoh dioustu, krak ha berr, n'en-deus ket da fizioud warnañ.

AR PAERON

Gwall otuz ho kavan, maouez, o kredi enebi ouz men-nad Doue, an Hini na fazi morse hag a dle an oll krena da zisplijoud deaÑ. War a welan, hoh-eus dezo d'en em lakaad etrezañ hag ho mab. Ho prazoni, evid doare, a zo da veza keñveriet gand ar pehed a gollas an droukêlez kerkoulz ha mab-den e-unan. Pa gavit abeg e barnedigez an Aotrou, o veza ma ne glot ket gand ho kasoni, diwal-lit hoh-unan da veza barnet disheñvel diouz an doare a garfeh. Bezit izelloh a galon hag e vo grêt deoh diouz ma reoh.

KATELL

Doue d'am miro d' E zismegañsi ! Allaz ! dister eo ma gouiziegez pa vefe red din kaoud, er heñver-mañ, skiant eun den-a-iliz desket. Ne vennfen ket, ha p'am-befe ar perz-se, enebi ouz youl santel an Aotrou, me eur grouadurez a netra. Med ma rank ma asant beza kevredet gand E hini, a-barz dieubi ar peher, e ro din or Hrouer ar gwir da jom diñali gantañ, evel ma soñjer amaÑ e Breiz. A hend-all, ne vije bet neb ezomm ahanon hag en-dije heuliet E venoz heb ho tigas davedon evel m'en-deus grêt. Setu ma kredan gand gwir abeg ez on dieub da

varn evel ma plijo ganin, heb aon da ober fae war E drugarez ouz ma mab torfetour.

Neb brazoni ennon, eta, hag ar gasoni a damallit din, hag a oa anei da genta, e gwirionez, a zo ét diouzin goude m'em-boe hirbrederiet. Daoust d'ar pezh a zeblantit soñjal diwar ma fenn, eh embannan, gand lealded, n'eo ket an droukrañs eo a ro lusk din da enebi ouz Doue, nemed hepken an ezomm a justis, hervez hini mab-den, a zo o vrouda ma houstiañs. Rag-se, n'en-devo ket Skolan ma fardon.

AR PAERON

Gwell a ze deoh ma n'eus neb gwidre en ho kalon, med ho pezit soñj e oar Doue peb tra guz hag ho-po da respont ma klaskit soucha outañ ar pezh a anavez.

Bremañ, o lakaad eo kuit a droidell an abeg hoh-eus da viroud ho pardon ganeoh, e veizan sklêrroh ho tigarez, ha ma zrevell a vo ho kendrehi da asanti da drugarez an Aotrou.

Eno, eta, emañ an dalh etrezom, hag ar pal am-eus da dizoud a zo ho lakaad da asanti dre gaer da vennad an Aotrou.

KATELL

Ya, med gand ma ne glaskoh ket an diskoulm gand spered eur barner nag eun trideg. Lakait hoh abeg da dalvezoud ar gwella ma helloh, evidon-me am-bo ar ger diweza, ne vern penaoz.

AR PAERON

Pegom gand ar hraf a zisrann on daou zonzj. Korv ho mab a zo bet kaset d'an douar, padal ez ee e ene da lez-varn Doue da glevoud e setañs. O veza ma oa gwirion keuz ha glahar Skolan a-raog e dremenvan, en-deus an Aotrou taolet eur zell a druez outañ hag, e-leh e sklapa en Ivern, en-deus divizet e rafe mil bloaz Purgator a-raog beza digemeret er Baradoz. Ar varnedigez a gavan eeun ha reiz ha ne welan ket perag eh enebit ouz youl santel Doue.

KATELL

Evid beza gouest d'am hompren ervad, e rankfeh ad-kavoud an doare en-deus mab den da zoñjal war an douar. Eun drouklazer amañ, evitañ da ziskouez keuz d'e dorfed ha da veza bet a-wechou pardon kerent ar muntrad, a vez kastizet garo hervez al lezenn. Hogen, n'em-eus ket c'hoaz an torfedou spouronuz ha diniver a reas an hini a halvit ma mab hag a oa ken gwaz hag an euzusa aerouant. Ra govesay dirazoh e oberou fallkr evid

m' ho-po tro da weled perag ez on aheurtet em mennad d' e lakaad da bêa e zle ken pounner.

AR PAERON

Ha klevet ah-eus, Yannig Skolan, petra a houlenñ da vamm ouzit? Ha dare out da respont didroidell?

SKOLAN

Ne vern pegen euzuz ha mezuz e vo din ar seurt arno-denn, eh anzavin ouzoh, heb nah netra, kement gwall am eus grêt e-doug ma zremen war an douar. Selaouit, eta, an dezrevell euz buhez vantruz ar bugel ho-poa dalhet war vên-font ar vadiziant.

D'ar mare na oan nemed eur hrennardig, e save ennon dija c'hoantou direiz ha, dalhmad, e vezen oh ober eun droug bennag, daoust da gelennadurez ha freadennou ma mamm, aketuz bepred da ober din suja dei. Skouer vad a roe din ha, mintin ha noz, e ranken lavaroud ma fedennou na zeskjon nemed dre heg, gand aon rag ar wialenn.

Diwezatoh, pa 'z ajon d'ar hatekiz ha d'ar skol, e-leh deski kreañsou ar relijion ha studia da zastum deskadurez e vezen o hallohad hag oh ober skol louarn. Eur hrouadur droug ha dinatur e oan ha, gand plijadur, e verzerien koulz al loened doñv hag al lapoused hag an amprevaned dister a gaven er mêziou.

Kaset da zeski ar vicher gwiader e laeren, diwar goust ma mestr, gwiadou lien a gaven an tu da werza dre guz, evid kaoud arhant da forana en tavarniou. Kemeret em-boa an tech da eva ha d'en em vezvi, heb rei morse netra euz ma goprou d'am mamm da zikour sevel ha gwiska ma c'hoarezed, hi koulskoude, ken berr all ganti ar pezh a houneze o tevezia.

Eur gwir landibuill e oan deuet da veza hag e pegas ennon kleñved ar hadaliez hag an orged. Ken taer am brouge ar c'hoantegeziou direiz ma saillen, heb an disterra doujañs, war gement maouez a gaven en eur horn distro bennag. N'on ket evid lavaroud ped bastard bis-koaz am-eus bet ha petra int deuet da veza. Buan, avad, e oe merhèd an tolead war evez ha war ziskred ahanon. Kerkent ha m'am gwelent, e redent pell diouzin, strava- get ha doñjeret. Ha neuze, pa ne gavjon neb plah da walha lontegez ma gwall dech, e teuas din ar menoz da ober riboderez gand ma c'hoarezed.

Gand eur vez divent eh anzavan o gwalljon o-seiz pa gavjon tro d'hen ober. An diou genta a lazjon didruez, oh o beuzi en eur poull don, war zigarez e hourdrouzent ma diskulia d'an archerien. An deirved hag ar bederved,

kollet ganto o fenn, e oe kaset d'ar folldi, hag o bugale a daoljon da veuzi er stêr vraz, evel kizier bihan. Ar bempved a lazaz he hrouadur hag en em zistrujas goude o vond ouz ar groug. An diou ziweza, louzaouet ganin da ober beb a goll, a varvas er poaniou skrijusa.

AR PAERON

N'eo ket iskiz, fillor, e vijes bet milliget gand da vamm, ha sebezet maro e choman dirag brazder ar vrei-nadurez a gontamme da galon.

KATELL

Kement-se, kenderv, a zo nebeud a dra e-skoaz an droug a reas war-lerh. Kalz gwasoh, siwaz! a glevoh c'hoaz.

SKOLAN

Allaz! paeron, ankeniet on dreist-goñvor o tiskoacha ma fallagriez dirazoh. Skrijuz meurbed e vo deoh ar peurrest euz an oberou diaouleg a chom ganin da zibuna... Plijet gand Doue e kavin nerz a-walh da gloza ma hovesadenn ouz an den salvet ma 'z oh!

A-viskoaz on bet eur gwall-skouer d'an oll, ha ma dudi a veze kaoud darempred gand ar falla hailloned a oa er vro. Evel-se eo e teujon da ober anaoudegez gand hiniennou aneo hag a veze er sabad. D' o heul ez ajon di eur wechad hag e oen kaset daved an hini a rene ar vodadenn. Eun den kaer a oa anean, gwisket kran hag azeet war eun tron euz ar haerra, savet war eur zichenn a-uh d'an dachenn. Lavaret e vije bet eur priñs ha ken birvidig ha ken entanet e oa e zaoulagad otuz, ma ranke an oll stoui o zellou dirazañ Evel ma havandidi, e taoulinjon dirazañ hag e pokjon d' e droad kleiz. Goude e oe red din tufa war ar groaz hag he bresa dindan ma z Reid, e-serr embann ne oan mui kristen. hag e troen kein da gelennadurez an Aviel. Neuze e oe peget ennon da verka, gand eun houarn ruz, dindan chouk ma hil, hag e oen laosket da hourvez e fank ar pehedou a blije ar muia din.

Dinahet em-boa ma badiziant ha digemeret beli Satan, o houzoud avad petra a reen. Da houde, c'hoant ganin da veza deuet mad da vestr ar sabad, ez ajon, eun deiz, da laerez ar Sakramant d'an iliz. Daoust ma talvez kalz arhant al lestr ma oa goarnet ennañ, n'eo ket al lestr e-unan a vroude ma c'hoantegez. Korv or Zalver dindan spesou ar bara eo a falveze din kaoud da gas d'ar sabad. Gand ar person koz e oen tapet oh ober ma laeroñsi. Ne oe ket evid ma flatra, avad, rak, gand eur

mestaol, hen divelljon war al leurenn, oh e laza mik. Goude koan, e tachenn ar sabad, e oe gwasoh ar sakrilaj. Ken spontuz e oe an dismegañs grêt d'Or Zalver, ma ne gredan ket digeri ma genou d'her honta, dre zoujañs outañ hag ouzoh.

Setu penn-da-benn ha dre vraz istor mantruz ma zorfedou e-keñver ma nesa ha ma Doue. Daoust ha m'ameus bet an dizamm aneo digantañ, e chom ma gwallou, gand o c'hwervoni ankeniuz da gontammi ma eñvor ha biken ne ouelin deo a-walh.

AR PAERON

E gwirionez, fillor, braz e oa niver ha grevusted da dorfedou ken mantruz ha ken spouronuz da glevoud! Netra ne hellfe ma zravuilla muioh.

KATELL

Pa 'z eo bet lamet o dallentez diwar ho taoulagad, kenderv, e taolit ho prall war ma zu. Fiziañs a zeu din n'am dislavaroh ket hiviziken.

Ha ma leorig bihan dianket? Goulennit, mar plij, ouz ho fillor petra eo deuet da veza. Aliez eo bet talvouduz koulz d'am nesa ha din, ha chalet on gand an diouer am-eus deañ.

SKOLAN

Ho levrig, mamm, eur skrid dister hag a nebeud a dalvoudegez, d'am meno, daoust ma n'on ket bet gouest d'e lenn, pa n'on ket desket evel ma ouezit, a zo bet laeret ganin ha bremañ emañ triweh goured dindan ar mor. A-viskoaz em-eus kredet e oa aneañ eun dastumad kuzuliou diwar benn perziou mad ar plant hag al louzeier hag eun nebeud doareou da ober sorserez ha kilia tud 'zo.

Moarvad n'eo ket braz ar holl hag an diouer aneañ.

KATELL

Pez gwallon a zo ahanout! N'on ket eur vaouez da ober sorserez na breou! Leor Pasion ha dazorhidigez an Aotrou Krist a oa ar skrid-se a veze c'hoariet ha diskle-riet an danvez aneañ dirag ar bobl. Soñj am-eus da veza grêt ar Werhez Vari, eur wech ma oa bet c'hoariet an arvest-se en or parrez. Setu perag e talhen kement d'am leorig ha n'eo ket ar viloni d'her beza laeret diganin am lakay da zeveni, kentoh a ze, ar pezh eo deuet da baeron da glask evidout.

AR PAERON

Arabad deoh t'eri, kiniterv! Kasaüz eo al laeroni a

ra deoh dioueroud eul leorig hag a brizhe kalz. N'eo ket braz ar holl pa heller kavoud eul leor all da brena.

Komzon, eta, euz ar pezh on-eus da gompesa ha na dleom ampella ken. Netra n'en-deus biskoaz na stravuillet ha gwasket kement hag ar govesadenn en-deus grêt ho mab euz e behedou dirazom. Netra morse n'en-deus poaniet kement ma ene, hag e krenan c'hoaz gand an euz o-deus silet ennon.

Ma vijen bet c'hoaz o veva er bed, hen argas em-bije grêt evel tud an douar ken dihouzvez all euz lezenn a garantez an Aotrou Krist, an Hini en em aberzas war ar groaz evid or savetei. Pa vezit c'hwi o pedi, beb mintin ha beb noz, ha meur a wech, moarvad, war an deiz, ha taoler a rit evez er homzou a zistag ho tiweuz dre voaz : « Pardonit deom on ofañsou evel ma pardonom d'ar re o-deus on ofanset ? »

N'eo ket euz ho kalon, a-dra-zur, e sav ar homzou karantezuz-se, rag p'en-deus Doue roet E bardon d'ho mab, e kendalhit da villiga hemañ ha da houlenn evidoh hebken trugarez an Aotrou, padal, evel eur bilpouerez ma 'z oh, e hetit, dre ho soñj, poaniou an Ivern da Skolan. Ha kredi a rit, eta, n'eo bet grêt al lezenn a bardon nemed evidoh ?

KATELL

Tavit, kenderv, gand ho teotadou digompren d'eur vamm ken reuzeudig ha ma 'z on. Re vraz eo pehedou ho fillor evid ma vin gouest morse d'o ankouaad.

AR PAERON

Hag e houlennit ouz Doue ankouaad ho re ? Soñjit hoh-eus pehet ive e-doug ho puhez hag e pehit d'an eur-mañ c'hoaz, o tinah asanti da bardon Jezuz, Or Zalver. Diwallit da gaoud keuz d'ho troukrañs diwezatoh, rag beb gwech ma houlennit trugarez Doue heb pardoni hoh unan d'ho mab, e rit eur pehed grevuz. Aliez e rit ar fazi-se a vo dalhet kont aneañ, p' en em gavoh e lez-varn Or Zalver war-lerh ho maro.

KATELL

Helavar meurbed ho kavan, kenderv, med ho tigareziou n'am zizont ket kalz hag e choman en amzivin diwar o fenn.

AR PAERON

Gwaz a ze deoh, maouez ! Dre eur madober a-berz Doue, em-eus bet ar gefridi da zond davedoh da deneraad ho kalon. Eur burzud anad eo hag a dlefe rei deoh da houzoud eo youl an Aotrou rei silvidigez d'ho mab. E c'hoant a dlefe beza eun urz evidoh ha, seul-vui ma

plijo ganeoh e seveni, e talvezo deoh evid ar vuhez peurbaduz.

Pedet hoh-eus Santez Anna hag ar Werhez Vari d'ho sklerijenna, med oh hen ober ez oh bet diboell ha digalon da ankouaad gras kaer an druez a ranker da gaoud evid pardoni. Dre halloud an diou vamm zantel, m'emañ ho spered en entremar, dauost ha ma virit bepred ar gasoni a zo ennoh.

Mamm digristen ha kriz, goap hoh-eus grêt aneo o klask o ali hag oh ober fae warnañ da houde.

KATELL

Kenderv, en an' Doue, damantit din ! Gwir eo ez on diwirion ouz ar Werhez hag he mamm. O levezon a zo warnon hag am broud. Hogen, na kaled eo d'an dizamma euz e valloz an hini en-deus milliget gand gwir abeg !

AR PAERON

Ne zoñjit nemed ennoh, padal n'oh ket nehet gand an dismegañs grêt da Zoue a zigoras, heb marhata, E galon d'ar peher flastret gand pouez e behed.

Ho kalon c'hwi, avad, n' eo ket hini eur vamm ! Ne vern pegen gwaz a vez grêt gand o bugale d'ar mammou all, e vez treh o harantez d'an drougoberou a laka enno kalonad.

Mamm dinatur ha kriz ! Mamm diboell ha na venn ket e vefe salvet he bugel, dellezoud a rit ive beza milliget gand Doue !

KATELL

A-walh ! a-walh ! kenderv ! Tavit gand ho tamallou c'hwero ! Emañ ar wir sklerijenn o tond d'am daoulagad. Dare on da zinah ar valloz am-eus taolet war ma mab Skolan.

AR PAERON

Ha n'eo ket ardou a rit aze, maouez, da lakaad termen d'or breutadenn ? Ha maro eo ennoh ar goell koz a zalhe ho kasoni e go, evel an hini a laka toaz ar bara da zevel ?

KATELL

E gwirionez, kenderv, adkavet em-eus ar garantez a vamm a dleed d'am mab en desped d'e oberou argaruz. Hen tui a ran dirag an Dreinded teir gwech santel.

Selaou, Yannig Skolan ; ma mab : da vamm az tizamm euz he malloz hag az pennig, en ano an Tad, ar Mab hag ar Spered, evid ma helli mond, eun deiz, da dañva eurus-ted ar Baradoz.

AR PAERON

Meulet ra vo Doue a hed an oll amzeriou !

SKOLAN

Bennoz deoh, ma mamm, pa vennit ma dibrada diouz arvar rouantelez an droukspered.

(Kerkent e teu Skolan hag e varh da veza gwenn-kann ha skeduz evel an heol.)

KATELL

Skolan, marheger ar Bed all,
c'hoaz n'eus ket pell e oah du dall,
te ha da varh, ken du ha glaou,
bremañ gwenn-kann ez oh ho taou.

Skedi a rit, re bar d'an erh,
hag ho liou flamm a zo ken gwerh
ha mantell gann or Mamm Intron
e barr he sklerded war he zron.

Endra warnout ma par ma zell
ma mabou lagad a zo trell.
Me ' glev ahanout c'hweg ar frond
euz bleuñv an Neñv amañ o tond.

Kalon hag ene ennon ' drid
evel da vrud ar haerra lid :
anken ha doan ma spered kêz
'zo nijet kuit d'am lakaad êz.

Sioulder ha peoh a zo en noz
ha frealz 'zeu d'am halon goz,
p'am-boa d'az karoud kent eun harz,
dre vurzud piou 'reas ar marz.

SKOLAN

Ho pardon, mamm, aluzenn wir
a drehas en ho kalon dir
war ho kasoni ouz ma gwall,
en-deus, heb mar, grêt kemend all.

Pa vennas Doue en E glod
'teuje an dir da veza blod,
euz ho trougiez reas skarz
ha, dre E youl, 'oe grêt ar marz.

KATELL, SKOLAN HAG AR PAERON

Meulom an Dreinded gand grad-vad,
skoazell mab-den er wasa stad !
D'an Tad, d'ar Mab, d'ar Spered Glan,
or meuleudiou hag or han !

SKOLAN

A-barz ma kimiadim an eil diouz egile, ma mamm, e rankan ho trugarekaad da veza teurvezet aberzi ar gasoni ho-poa kemeret ouzin en abeg d'am fallagriez. Ra vezoh benniget da viken ha plijet gand Doue rei deom ar hras da veza unanet, e-doug ar Beurbadelez, er garantez adkavet ganeom a oa bet torret dre ma fazi.

KATELL

Kenavo ahann d'an diweza deiz euz ma mil bloavez astiz ha ra gouezo warnoh bennoz santel an Aotrou !
(A-nebeudou e steuz splannder ar spesou hag a-daol trumm ez eont diwar wel.)

Amañ eh echu ar c'hoari.

D'an 10 a viz gwengolo 1964.

YEUN AR GOW.

Niverennoù koz "BRUD"

1. **TAN HA LUDU** (*peziou c'hoari*), gand Per Jakez Helias
LOD ALL A VARV, gand Per Trepos.
2. **DANEVELLOU**, gand Brisson, Yeun ar Gow, Yann Gorrigan.
3. **KARANTEZ**, gand Mab an Dig.
4. **KIZIER-NOZ SANT PABU**, gand Mab an Dig — **DANEVELLOU**,
gand Yeun ar Gow.
5. **FEST-NOZ E GRONVEL**.
6. **GURVAN AR MARHEG ESTRANJOUR**, gand Tangi Malmanche.
7. **DANEVELLOU**, gand Fanch Inizan — **BARZONEGOU**, gand Dreo
Koulouarn.
9. **MOJENNOU BREIZ**, gand Per Helias.
10. **MONA MEZNAOD**, gand Mab an Dig — **DANEVELLOU**, gand
F. Inizan.
13. **MARVAILLOU AR VOTEZ TAN**, gand Per Helias.
16. **KOZIOU TINTIN MARI**, gand E. ar Barzig.
17. **PEVAR FEZ-C'HOARI**, gand Per Helias ha Nest an David.
18. **MANAH LOKMAJAN**, gand Mab an Dig.
19. **MEVEL AR GARANTEZ**, gand A. an Diuzet.
20. **KALONOU TREGERIAD**, gand E. ar Barzig.

4 l. pep niverenn

E GALLEG HAG E BREZONEG :

ARLEQUIN DANS LE THEATRE BRETON, gand L. Bloklander . . . 15 l.

E GALLEG :

LE CATHOLICON DE JEHAN LAGADEUC, gand Per Trepos 3 l.

Ha prenet ho-peus **BILZIG ?** 13 l.

Kas an arhant da **G.R.P. Brud PM Mevel, 29 N Brest - 1499-55 Roazon**

*Forz war pe zachenn e stourmit,
ne hellit ket tremen heb lenn " BUEZ BREIZ "*

" LA VIE BRETONNE "

*Kelaouenn renet gand J. MARTRAY,
a zegas beb miz eun danvez studiet-piz war gement kudenn
a zo o selloud ouz Breiz.*

Brezoneg a vez e peb niverenn

Komanant-bloaz (10 niverenn) : 10 lur

K. R. P. 1894-85 Roazon - 1, stréd Poullain-Duparc - Roazon

MANER KUZ

*Ha prenet ho-peus **Maner kuz** ?*

*Barzonegou brezoneg ha galleg
gand Per Jakez Helias*

Hastit buan, ne chom ket ken kalz a skwerennou !

12 l. da gas da A. LE MERCIER, 29 N Brest

K. R. P. 1819-42 Roazon